

REIZ

ROET

GAND AN TAD R. QUADRUPANI

EVIT MAD

EUN INE C'HOANTEK BRAS

D'EN EM AVANS EN HENT AR ZANTELEZ

Troët en Brézonnek

GAND P.-I.-P. G., PERSON

PLOUEC-AR-MOR



LANNION

J.-F. LE GOFFIC, IMPRIMEUR-LIBRAIRE

—
1859



27

LEB

Diocèse de
Quimper & Léon
— E. Kappit Kempartha Léon —

Document numérisé en 2016

33033

REIZ

ROET

GAND AN TAD R. QUADRUPANI

EVIT MAD

EUN INE C'HOANTEK' BRAS

D'EN EM AVANS EN HENT AR ZANTELEZ

Troët en Brézonnek

GAND P.-I.-P. G., PERSON

PLOUEC-AR-MOR



LANNION

J.-F. LE GOFFIC, IMPRIMEUR-LIBRAIRE

1839

fb
248
22
QUA

APPROBATIONS

NOUS, ÉVÊQUE DE SAINT-BRIEUC
ET TRÉGUIER,

Avons approuvé et approuvons, pour être publiée dans notre diocèse, la traduction bretonne d'un petit livre in-32, intitulé : *Le Cœur agonisant de Jésus*; et reconnaissons comme authentiques l'Indulgence plénière et l'Indulgence de cent jours accordées, par décret de S. S. Pie IX, le 2 février 1850, à la prière : *O clementissime Jesu*, ou : *O très-miséricordieux Jésus*, qui s'y trouve renfermée.

Saint-Brieuc, le 24 octobre 1857.

† J.-Jⁿ PIERRE,

Évêque de Saint-Brieuc.

Nous soussigné, vicaire général de Monseigneur l'évêque de Saint-Brieuc et Tréguier, ayant examiné une traduction bretonne, faite par un prêtre de ce diocèse, d'une partie du livre intitulé : *Direction pratique et morale pour vivre chrétiennement*, par le R. P. Quadrupani;

Déclarons que nous n'y avons rien aperçu qui blesse la foi ou la morale chrétienne, que cet ouvrage nous paraît réaliser la valeur du titre qu'il porte et pouvoir être utile aux lecteurs de toutes les conditions qui voudront s'en servir.

Nous autorisons, en ce qui nous concerne, l'auteur à faire imprimer son travail.

Saint-Brieuc, le 21 mars 1859.

AUFFRET, vic. gén.

KENT SKRID



1. An oberou mad dreizo ho unan, eme sant Augustin, a deu da veza sal gwelloc'h, hag a delit muioc'h hon meulodi ma-z-int gwelloc'h reizet, rag heb urz na zo vertu a bet.

2. Evit-ze he kennigomp dec'h eur reiz a vue hag a kaveot enna oll dleadou an denn, e kever an aotrou Doue, e kever an dud all, hag en he geveur he unan.

3. Dleout rear lakaat er fad er spered penos an aliou mad-mañla-ket amâ evit ho reiz, na oblijont

(VI)

didan poan a behed abed ; zellet anezo evel eur reiz, nan evel eur gourc'hemen. Ar chadennou zo evit ar sklavet, na nint ket evit bugale an aotrou Doue : ar re ma na anaveont hual a bed nemed karante ha bolonte vad ho mestr. Nemedo ket gand doan rag kasti, hogen dre garante hag anaoudegez a tenn eur bugel mad madelezou he dad warneza.



DLEADOU E KEVER AN AOTROU DOUE.

I.

Dleadou ar gristemien e kever an aotrou Doue a zo miret er vad ar *religion*, ha dre ennon gwelaad bemde, ispisial de bidi, da glevet an overen, da govez ha da gommunia, da viret ar gweliou, ha da lenn levriou mad.

Lavaromp eur guir war peb hini euz an treou-ze.

AR. BEDEN.

1. Dre ar beden, peurliesia, a ro an aotrou Doue dimp he c'hrasou,

Ar beden a ra pignal an den betek an aotrou Doue, eme sant Augustin, hag a ra disken gras Doue war an den.

2. Peb tra a neuz he vent hag he veven, pe he lezen. Pa lavar ar skritur sakr ez eo ret pidi dalc'h mad; ze na dalket da lavaret e kleer beza bepred ho pidi. An dra-ze ne mâ ket en gallout an den er bed mâ. Hogen euz ar c'hoant da veuli an aotrou Doue en hon oberou all a klever an urz-ze, hag ar c'hoant-ze dleomp kaout bepred; evit-ze lavar an aotrou sant Augustin: mar eo stank ho c'hoant, ho peden vezo stank ive; mar pad ho c'hoant dalc'h mat, ho peden vezo ive dalc'h mad.

3. Reizet ho pedenou diouz ma emedo ho ine, ha diouz al labou-rou a c'houlén ouzoc'h ho stad.

4. An hini astenn he beden betek doania ha re garga he spered, a ia eneb *but*, menoz ar beden. He menoz eo maga birvidik enna ar c'hoant da veuli Doue. An doktor, an aotrou sant Thomas, a neuz roët dimp al lezen-ze; na dle-ze ket beza ankouaët gand an ineou-ze mad a hent all, a feaz ho spered dre re bidi, eleac'h he pebeva. An den poëlluz ha reiset a paouëz dibri pa neuz toret he naon pe mar sant poan en poul he galon, pegement benag a ve iac'huz meurbet ha blazet mad ar boëd a hent all.

5. Na dleomp kamed c'huita da c'hleadou hon stad evit pidi diouz hon c'hoant. An aotrou sant Thomas a zisk dimp penoz p'en hem roomp d'hon dleadou evit plijout da Doue hebken, a ro dimp euz he

zorn ar grassou hon euz ezom, heb pidi stanck zo ken ; al labour hag an drevel a gemer he leac'h. Muioc'h zoken a delit ez euz o labourat evit an aotrou Doue eget o komz gant ha er spered hebken, evel ma rear ebarz ar beden.

6. En em zivallet euz ar preder ze a doug ac'hanoc'h da verna pedenou a c'henou : zantelet anezo kentoc'h ouz ho lavaret gant peuch hag preder. Na neo ket ar boëd foun a ro nerz, hogen an hini poazet mad en poul ar galon. Evit-ze, lavare sant Fransez de Sales : *Hon c'harante hon unan a zo eur skanvelard hag a astrob meur a dra, ha na denn netra da vad.* Nebeut hag er fad, setu an den poëllek ha fur ; kalz ha fall, setu an den dievez hag he devez re vraz kreñ en-han he unan.

AR BEDEN A GALON PE AR BREDEREN.

1. Ar beden a galon a ro sklerijen ha nerz d'hon ine. David lavare diout han he unan : *Ar Brederen he deuz astommet ma c'halon, ha laket enni tan ar garante.*

2. Gret bemde eun hanter heur orezon a galon, nemed c'hui ve harset gand klenved pe gand eul labour benag dreist vuzul.

3. Reizet ho prederen adalek an noz diaraok, da viana araok he boulc'ha. Neuze ar spered en hem ro ezetoc'h dar pezh a ve reizet diaraok.

4. Gret ho prederen peur vuia war ar pezh a lakao en ho kalon fizianz ha karante Doue ; ho spered a denno dibaot a vad euz an treou a ra spont. Dec'h elleur lavar ar

pez a skrive sant Fransez de Sales da eun Itron. *Difen ran dac'h ober orezon war ar maro, ar varn, an ivern. Ar spont a ra an treou-ze a zo mad meurbet, hogen na neo ket evit ho ine, a zo dija re aonik.*

5. Na ret ket ho prederen war meur a dra, er memez amzer ; hogen war eun dra hebken, ha c'hoaz berr. Heulied ali ar re muia gwiek etouez tadou ar vue spirituel : hon c'halon a dle muioc'h labourat evit hon spered, en orezon a galon. Rag ar brederiez eo an doare, hag ar garante, ar galoniez an abek a tennomp deza.

6. Mad eo ive mont dar brederen, sioul ha peuc'h, heb re vraz aon euz an distraksionou. Daou vad a ra dac'h an distraksion eneb ho c'hoant : unan a binijen ; rag beza dic'hallout d'en em zastum

enna he unan dirag an aotrou Doue, a zo eur boan vraz evit ar spered ; setu perag santez Tereza lavare : *Mar na ran ket peden a galon, pinijen rein da viana ; egile eo vad ar beden a galon zoken, rag an aotrou a boëz ar c'hoant kement hag an dra ; pa na medo ket an dra-ze en hon gallout.*

7. Eur vad braz vezo evidoc'h kaout dirag ho taoulagat ar reizma roët gand sant Fransez de Sales : *Eur brederen vad meurbet eo beza peuc'h ha zioul dirag hon salver Jezuz-Christ ; heb c'hoant nag esperans all abet, nemed beza gand ha a plijout deza : eur bugel, war bruchet he vamm, na lavar ghir, hogen oll a lavar dre he zellou karan-tezuz, a lavar he eurusdedt da veza en tre divrec'h he vamm.*

8. Da finn ar brederen na neo

ket mad berna he *resolutionou* ; hogen neveat ispisial ar re eneb hon penn-ioul, pe an drouk krenva en hon c'halon. Kalz *resolutionou* a sparl an ine heb he ober tam gwelloc'h, peurliesia an hini a lavar rei kalz a ro nebeud.

9. Santez Tereza a c'houlenn ma vemp en hon eaz ho pidi, evit na vezo ket distroët hon speret euz an evez e tleomp lakat dar beden, ha da veza dirag an aotrou Doue. N'en em feazet ket eta dre c'homme re bell daoulinet. Aoualc'h eo ma vezo ho spered izel dirag an aotrou Doue, gand an doujanz, ar fizianz hag ar garante zo dleet deza.

PEDENNOU BERR HA BIRVIDIK.

1. Ar pedennou berr ha birvidik a zo sonjou ha dezirieu ner-

zuz ha karantezuz a sav an ine war zu an aotrou Doue. An aotrou sant Fransez de Sales o komz diouto, a lavar e telc'hont lec'h dan oll bedennou all ; e pad an oll bedennou all na dalfen ket ar rema.

2. Ar pedennou berr ha birvidik ec'h ell beza gret en peb amzer, e peb lec'h, hag e peb labour. Evel ma kemerer madigou a c'huëz vad evit dousaat ar genou ha nerza poul ar galon, er memez doare rear pedennou berr ha birvidik evit nerza ar spered.

3. Ar menec'h koz, a ra komz sant Augustin diouto en he liser dan Itron *Proba*, na ellent ket ober pedenno hir, ret oa dezo gounit ho barra gant ho labour pemdeiek. Ar pedennou berr ha birvidik a ront aliez ho dic'haoue euz mank ar pedennou all : hag ec'helleur

lavaret koulz goude a pedent heb paouëz, dre ma rent bepred ar pedennou-ze epad al labourou pouner a rent bepred.

4. Karout rafen a lakefec'h ho aked d'en em nerza da ober aliez eur beden ken talvoudek, ker ezet hag a raio mui a vad dac'h evit meur a beden a c'henou, pere gret aliez na dalveont nemed da feaza an teaud, ha nann evit sklerigeni hag ober had beva an ine.

AN OVEREN SANTEL

1. War an aoter Jesus-Christ a nevea ar zakriviz en deveuz gret var ar groaz, gand an disheveladigez m'en deuz skuillet he oad war ar groaz, hac en overen na ra ket.

2. Dre vertu ar zakriviz-ma, eme

sant Thomaz, a reomp pevar zlead, hag a stag an den ouz an aotrou Doue : 1^o Enori reomp he vrasder hag he vajeze : 2^o A paëomp evit hon pehejou tremenet : 3^o Trugare kat reomp en aotrou Doue euz he vad oberou : 4^o Goulen reomp diganta sicour evit hon ezomou brema.

3. An overen a neuz eun dalloudegez divent, *infini*, abalamour ma emedo enni delitou Jesus-Christ, hag a zo divent ive. He freuz na eo ket *infini* evidomp, hogen diouz deoliez pe devotion an hini a lavar an overen, hag an hini ra he lavaret, pe he chilaou. Ar mor braz, eme an aotrou sant Augustin, a neuz dour divent, peb unan ec'h ell tenna diouta, muioc'h pe nebeutoc'h, diouz ar vesel zo gantan evit kemeret. Ar vrasder divent euz

ar mor glaz, a zo eur skeden euz delitou divent hon salver Jezus-Christ en overen ; ar vesel-ze brasoc'h pe vianoc'h, eo brasoc'h pe bianoc'h deoliez an hini a gemer lod er zakriviz.

4. Ret eo eta he c'hlevet gand deoliez, devotion, ha peger meulapl benag eo klevet meur a overen, meulaploc'h eo c'hoaz ho c'hlevet gand deoliez.

5. O vont dan overen, lavaret dac'h ho unan : Sonjou an douar et pell diouzin ; ez-an dar menez santel a Doue elec'h ma tle oll beza karanté ha zantelez. Et dan llis devot ha sioul.

6. Araok ma teraou, ma kommanz an overen, pe adalek neuze dan nebeutan, gret eun akt a c'hla-c'har berr, hoguen birvidik ha karantezuz evit netaët ar galon-ze a

dle klevet ha kemeret lod en zakriviz eun Doue ar glanded dre natur.

7. Peb peden, pe hi vezo gret a c'henou, pe hi vezo a galon, a zo mad evit tenna freuz euz an overen, evit an hini a glev anez-hi. Mad braz vezo prederenna war ar mysteriou skedennet gand ar pezh a ra ar belek. Na brederennomp kouls goude nemed war nebeud a roueziou er memez amzer, evit rein muioc'h emzer d'ho prederiez devot, hamuioc'h c'hoaz d'hon chaloniezh. Fazia meurbet ara an ineou ze a laka brasoc'h preder da lavaret forz pedennou, evit heulian ar belek, evit da lakat en ho c'halon prederiez ha kaloniezh zantel. An dra-ze zo kentoc'h peden an teaud evit eun akt a relijion.

8. War dro fin an overen, pe da emzer er gommunion, em kenni-

get gand kement o c'heuz da Jesus-Christ; en en em kennig evidoc'h d'he Dad Eternel. Gallout ellet ive, mar keret, ober ar gommunion *spirituel*, pe a spered.

9. En eun ezom spesial, pe da seiz gwel unan euz hon Patronez, pe euz eur zantez Patronez, vezo mad ober lavaret eun overen gand eur belek zantel benag ec'h anave hon ezomou, evit ma pedo birvidik evidomp.

10. Ar gwerz overennou a dalfe evit an aluzennou azomp rediet da ober *herve hon* stad hag hon danve.

KOVEZION, KOMMUNION, LENNADUR ZANTEL.

1. Ar govezion zo unan euz an doareou muia nerzuz evit ober peuc'h ar peher paour gand an

aotrou Doue, mar en euz c'hoant ober eun distro warneza he unan.

2. Mad braz a kavan a kovezzefec'h da nebeuta peb pemzek de, ha kerliez gwech ma teui ezomp dac'h.

3. Evit an *esamen*, eur c'hart heur a zo aoualc'h, eme an aotrou sant Fransez de Sales evit ar re a govesa peb eiz deiz. Gret ho kovezion er mare ma chomo genac'h emzer a oualc'h evit nem prepari ezetoc'h dar gommunion zantel.

4. Lavaret ho pehejou oll, betek an distera, na neo ket ar pezh a groaz anezo, muioc'h evit na baët ho tle ho kompta just ar pezh a dleet. Ouspen ho kovizor anave stad ho ine, hag ho pehejou peur-liesa. Eun *esamen* re strik na ve mad nemed da skuiza ho spered, ha da desec'ha ho kaloun.

5. Lekeet er vad en ho penn da ziwallout ar pehejou oll, ispisial ar re a koueet peur liesa enno.

6. An ine a gaz peurliesa ar pehed, a neuz ive peurliesa kunv da veza pehed; na vezo ket eta diez deza kaout ar gontrition brema. Na ouveet ket a c'houi a neuz-i, n'he zantet ket, rag peurliesa na neo ket gwelluz, da lavaret eo ho skianchou n'he zantont ket; hogen ar *gontrition* oc'heuz, pa gaz ho kalon ar pehed; rag setu ispisial ar *gontrition*. An ninv oc'heuz na gaz fec'h ket ar pehed a zeu euz ar gasoni oc'heuz out-an, evel ar c'hoant da garet an aotrou Doue, a zeu euz ar garante oc'heuz evita.

7. Gret peb gwech ho kovizion evel pa ve an diveza euz ho pue; gallout ell beza en gwirionne; lavaret neuze ar pezh a larfec'h, ma

vize bet lavaret an draze dec'h. Lavaret skler, gand fizianz, hag heb distro, ho pehejo oll, ispisial ar re eneb ar *burete*. Komzet ouz Doue, netra nâ kuzet outan; eyez-zaet na rafec'h an den gwiek, ha na gusfec'h netra en dra-mâ.

8. Kovevesaët, nann evel ma plijo genac'h, hogen evel ma plijo d'ho kovezor. En doare-ze ho kovizionou a rai nebeutoc'h a vad d'ho speret, ouspen a plijoint dan aotrou Doue. Marteze n'ho c'hafet ket mat; hogen brasoc'h delit ho pezo.

9. Ar gwella doare hag ar muia gwirion, eme an aotrou sant Thomaz, evit gouveet ha c'hui zo en graz Doue, ha gouveet dre ennon hag en zo pardonet ho pehejou dac'h, eo da zellet piz ho pue bremâ. Mar displij an emzer

dremenet dac'h; mar na goueet ken en ho pehejou koz, eur merk eo ezeo tec'het an drouk, hag ema graz Doue ennoç'h. Ma vizegriziu ho kalon ken goallus evel gwech all, a rofe ar memez freuz evel diagent. Er giz ze e komz an aotrou sant Fransez de Sales. An abek-ze zo aoualc'h evit lakat ho spered ezet evit an emzer dremenet.

10. Ar gommunion gret aliez, a zo unan euz an doareou gwella evit mont war raok en hent ar zanteles. *Mar goulenn tud ar bed ouzoc'h perag a kommuniñ ken aliez; lavaret dezo eo evit diski karet Doue, evit hem netañt euz ho gwallou; en em zizober euz ho faziou, evit em gonforti en ho trubulou; en eur gwir evit em nerza en ho sillidigez. Tud ar bed, hag a neuz nebeud a labour, a dle kommunia*

aliez, pa o deuz emzer evit-ze; ar re zo karget a labour, a dle ober dre exom; rag an hini a skuiz meurbed, a neuz labour a vèrn war he gorf pe he spered, a neuz exom euz eur boñd mad hag aliez.

11. Ar breparation evit ar gommunion ave gret pea ziabell pe nesa. An hini genta eo miret bepret ar galon neat dre ar gasoni evit ar pehed, ha ma ga enni eur c'hoand birvidik d'en em vezur gand ar boñd-ze deut euz an env.

12. Ar breparation tosta azo merket dimp gant sant Franzes de Sales dre ar c'homzou-mâ : « Ret » eo digazz dar gommunion eur » galon losket gant tan ar garrante. » Ankouaomp oll neuze, an oll grouadurien, evit n'hon devezo sonj nemed euz hon c'hrouer ezeomp da resev.

13. « Ret eo ouspen; a lavar ar
 » sant, em lakaat a grenn etre
 » daouarn an aotrou Doue he
 » unan, nan hebken evit ar pezh a
 » zell madou ar bed-mâ; hogen
 » ispisial evit ar pezh a zell mad
 » hon ine. Dirag he vadelez divin
 » ez eo ret ober an dilez euz hon
 » c'haloniezh, hon c'hoantegéz, ha
 » dezirioù evit ho huja oll a grenn
 » deza. Kredomp stard a talc'ho
 » hon Salver euz he du dar ghir
 » en devez roët : a sav-ze hon
 » izelded betek liout he vrasder,
 » ha beza manet gand-hi. »

14. » Eur gommunion hebken a
 » zo aoualc'h evit ober ac'hanomp
 » zent. Hogen ar pezh zo kiriek
 » na domp ket zanteleet gand-i eo
 » abelamour hon Salver Jezuz-
 » Christ a gav hon c'halonou leun
 » a désirio, a galonies, a c'hoan-

» tegès,.... hag a c'houlenn ma
 » vent goulo evit beza mest enno. »
 Araok ha goude ar gommunion
 eta hem roomp oll da Zoue, na
 glaskomp nemed he garante ha
 plijout deza, ha greomp an draze
 gand eunder, kaloniezh ha herder.

15. Derc'hent ar gommunion,
 gret alies pedennou berr ha birvi-
 dik a vago en ho kalon kaloniezh
 zantel hag eur fizianz vraz da
 veza zanteleet. Da riez ho kom-
 munion zo ken merket ho anaou-
 degez vad, ho c'hadoration, ho
 peuc'h en Doue gand ar memez
 pedennou, hogen gret anezo heb
 poëllat, kontraign, nag aket re
 vraz mez en eun doare douz ha
 karantezuz.

16. Komz rear ouz an aotrou
 Doue gand eur zell hebken euz an
 ine. Mar ankouaët eta ar peden-

nou-ze n'en em drubulet ket evit-ze. Esperet a raio an aotrou Doue dac'h ar c'hraz da gaout zonj anezo eur veach all, chomet en peuc'h.

17. Mar en em roët da c'hrad vad an aotrou Doue er gommunion zantel, a tougeot gand peuc'h ha herder zec'hder ar spered hag ar galon, heb kemeret poan da c'houveout a belec'h a teu. An ine zentuz ouz Doue a gemer diganta an drouk hag ar vad, evel ma teu.

18. Evit ho lennadur devot, kemeret al levriou gwella evit maga ho ine. Evit-ze lennet hag astennet imitation hon Zalver, levriou Sant-Franzes de Sales ha real hanval.

19. Pa ret ho lennadur devot, lekeet en ho spered ha kalon, evel

pa ve Doue he unan a gomzfe ouzoc'h.

20. Kredet mad eo an doareou dic'hiz bepred arvaruz, *z suspect*, hag ezeuz avel kuzet didano. Setu perag a lavare sant Bernard : « Eur » vertu vraz eo ober treou boutin, » kommun en eun doare neo ket » boutin. » Mar klaskomp an iskis beomp en en hon c'halon ha dirag Doue, da lavaret eo, kaout un intention, eur menoz eun, ha karante Doue. An ine-ze a zo en gwirione iskis a gred ne deve netra na ve boutin.

MIRIDIGES AR GWELIOU HA SULIOU.

1. Peb hini euz hon deiou a dle beza reizet evit gloar Doue. Hogen miret en devez unan benag e pere a c'houlenn eun enor spe-

sial : an deiou-ze eo ar zuliou hag ar gweliou berz.

2. An deiou-ze eta, a tleer miret gand muioc'h oberou a devotion ; an overen, ar gousperou, ar zakramanchou, ar beden, ar brezegen, al lennadur devot.

3. Na dleer ket koulsgoude skuiza nag ar c'horf nag ar spe-
red, dre oberou re hir a devotion. Ama teu c'hoaz ar pezh em euz lavaret euz an orezon.

4. Gallout elleur ive, en deiou-ze em welet, ober eur bale benag, eur c'hoari reizet, en eur ghir, kement tra ec'h ell beza kenniget dan aotrou Doue, hag a zo mad evit miret ar zuliou hag ar gweliou, evel ma tere. Er memez tra ec'h elleur ober ar pezh a c'houlenn buegez an dorn ; evel ober an dinel, diskuiza, kousket. Kement-

ze oll na harz ket na ve miret mad an deiou-ze.

5. An treou-ze oll a lavaran evit konfort an ineo em ne'ch-heb abek evit miridigez ar zuliou ha gweliou kentoc'h a seblantont ; heulia kredennoù direiz ar Pharizeed el lezen goz, evit ar spe-
red a frankis a neuz roët Jezuz-Christ dimp en he aviel. Em viret a dleomp ouz an *dissipation* an trezeñs, hag ouz ar pedennoù re hir.

6. Mar oc'h euz rezoniou mad a vir ac'hanoc'h da glevet an overen pe an ovizou all ; lennet en deïou ze eun dra benag war al lezen gristen, evit miret na an-
kouefec'h diskadurez hon religion zantel.

7. Mar digoue dac'h eun deiz zul pe gwel da renkout beaji pe

labourat; na vet ket daoniet dre na hellet ket ober ho tleadou peur liesa a devotion. Askemeret ho pedennou berr ha birvidik; evel ma on euz lavaret he talc'hont lec'h dar pedennou all oll.

8. Kemeret evit gwir mad, ez eo aoualc'h klevet eun overen a voëz izel, evit ar re a renk evesaët ar ger, diwall bugale vian, klevout ouz tud klanv, rag ar justiz hag ar garante a c'houlen heveleb tra. Ha neuse eul labour zantel a dall eur beden hir.



DLEADOU E KEVER AN NESA.

II.

Hon dleadou e kever an nesa eo ar garante, hag ar wirione. Hi a dle reiza hon c'halon hag hon spered, hon c'homzou, hon darempred, hag an implic'h a dleomp ober gand hon danve. Evit ar galon a tisk reiza he c'harante; evit ar spered, a tisk pellaët diouz barnidigez diabek, hag an disfizianz; evit an tead, a tisk evesaët ouz ar c'homzou noazuz hag an drouk prezeg; evit an danve a lavar penoz ober an aluzon; evit an darempred penoz a vezer mad ha drant pe aimapl Lavaromp eur

ghir *benag* war peb unan euz an treou-ze.

PENOA A TLEOMP KARET HON NESA.

1. Ret eo karet an nesa abelamour ma zéo bet krouët gand Doue, hag evit Doue. Evelze karante Doue ha karante an nesa a zo evel daou vranc euz ar memez goëen, ar memez grizien ho deuz, evel ma lavar an aotrou sant Gregor ar Braz.

2. Pell diouzin eta ar garante displed-ze a interest, hag a likaouërez pe a *sensualite*, kement eneb ar garante gwirion evit an nesa, evel ma ema ar pehet eneb ar vertu, an ivern eneb ar baradoz.

3. Eveseomp ouz ar garante *sensual*; dreizi e karer an nesa

evid he c'hened, evit e spered lemm, evit he dalanchou, en eur ghir evit kement a blich dar kianchou.

4. Eun heveleb karante a deu buan dar garante *sensual* : an denn gwiek, sant Avilo, a disk dimp ez eo diessoc'h reiza ar garante mâ, evit na zéo beza fur pa vezer sot.

5. Da genta eun eveleb karante a seblant divlamm, vertuzuz mar-teze soken, hogen a nebeudou a teu da veza eur poëzon noazuz. Hanval eo ouz eun aër pehini didan skant lugernuz, hag eun teaud kaër ha displek, a soug belum hag a ro ar maro ; pe ouz ar c'hurun, a sko hag a ro ar maro en emzer ma weler an tan. Diouallet eta, ouz karante re vraz an dud-ze, a heuill avelou ha plijadurezou ar bed; diwalet, pautred ha merc'hed

an eil ouz egile, na veet kevredigez abet penn ous pen, hag eleac'h na vezo nemedoc'h, abelamour d'ho pleg revraz evit an drouk.

6. Pa lavaret ho nesa, a lavaret kement denn a zo salvet pe hell beza salvet; er barados e ma ar penn euz ar garante. Na ellet lakat er meaz nemed an diaoulo hag ar re daounet.

7. Ho karante a dle tiout betek an dud difeiz, hag ar beherien, rag gallout ellont em rei da Zoue ha beza zalvet. Ouspen, eme an autrou sant-Augustin, daou zra a zo da sellet en dud difeiz hag er beherien. 1^o Krouët int bet gant Doue evita; setu perag ho c'harer. 2^o An denn a neuz gret ar pec'hed, kazet hema. David a lavare : Kazet em euz an dud fall gand eur garante gwi-

rion : *Perfecto odio oderam illos* (ps. 138. 22). Pegoulz eta hon euz eur garante gwirion? pa gazomp ar pehet o vaga karante evit ar peher.

8. Ret eo eta karet an nesa evit Doue; hag ar garante-ze a dle beza paduz, effeduz hag evit an oll.

9. Karante *padus*, rag an abek a radimp karet a bad bepred. Mar neuz an nesa broudet ac'hanomp; krouadur an aotrou Doue eo bepred, gret evita; ha dre ennon en devez gwir en hon c'harante. Kazaët ret al louzou fall a dihoan en douar fraost, hogen na gazet ket an douar ec'h hell rein gwiniz kaër mar be labouret mat.

10. Ne ma ket koulz goude en hon gallout, miret n'hon be eun tam kaz, eneb ar re a neuz broudet

ac'hanomp. Hogen zantout kaz ha plega deza zo daou. Paz eo gourc'hemenet dimp karet hon enebour, hag an hini a neuz broudet ac'hanomp; ar gourc'hemen-ma a denn he nerz euz hon feiz, euz hon religion, ha nan euz hon natur.

11. Ouspen, ar garante-mâ a dle beza evit an oll, ha dre ennon hanval ouz ar glao mad, a gouëz er memez doare war ar roz ha war ar spern, war baleziou ar binvideien, evel war lojou ar beourien. Mar diansavet eun *articl* heb ken euz ho feiz, neuz ken a feiz. Ar memez tra eo euz ar garante evit an nesa, mar laket eun den, unan heb ken, er meaz euz ar garante, na neuz ken a garante.

12. Hogen ar garante ze eviti da veza evit an oll, a gresk c'hoaz

dre ar plegou roët dimp gand an natur, gand anaoudegez vad pe gand abegou all honest. Evit-ze a skrive sant Thomaz penoz ar gerentiaz, ar memez diskadurez, ar memez bro, ar memez feson da gomz, ec'h hell kriski evit eur re benag; ar garante-ze a zeu euz a Zoue hag a distro deza. Evit an dra-ze a prizomp hag a karomp muioc'h hon c'herent, hon madoberourien; an dud fur ha vertuzuz; en eur ghir ar re ra mui a vad dimp, pe a enor mui an aotrou Doue.

13. Ar garante evit an nesa a dle beza nerzuz, *effedus*; da lavaret eo a kleomp sikour hon nesa herve he ezom hag hon gallout. An tan, eme ar Pab braz, an aotrou sant Gregor, mar na dev ket neo ken tan; er memez tra,

hon c'harante, mar na zikouromp ket hon breudeur en ho ezom, na neo ken karante.

14. Nellomp ket mankout da veza deread ha kanrantezuz en kever ar re fall, en kever zo ken ar re a neuz broudet a c'hanomp, ha lakat herr zoken d'ho zikour, pa ve ret.

15. Arabad eo, evit gouir, miret en hon diabarz herez ouz ar re fall, nag ouz ar re neuz broudet a c'hanomp; eur vad eo koulz-goudé kaout evez bras; an draze zoken zo eur furnez ret. Tud zo ha n'ellur ket beva en peuc'h gand ho a nez beza pell diouto, neuze pellaët zo furnez ha nan kasoni. Piw na dec'h ket araok eun den skoët gant ar vosen. Tec'hel ra nan dre gasoni evit ar c'hlanvour mez gand doan rag he

drouk. Ar garante a lavar dimp karet hon breudeur, hag ober vad dezo, mez na lavar ket dimp dougen dorn dar re fall; na lakat ar re vad hag eün da veza tiet gand ho. Bezet deün, *simpl*, evel eur goulm, a lavar hon Zalver Jezuz-Christ, mez bezet poëllek, fur evel eun aër.

16. Eveseet na rafe eur basion sekret ha kuzet dac'h, kemeret evit furnez dereat ar pezh zo eur gasoni kuzet.

BARNIDIGEZ DIABEK HA DISFIZIANZ:

1. Barn an nesa, enna he unan, heb rezon skler, a zo ober dismeganz d'he vreur hag offensi, flemma, Doue.

2. Alexandr ar Bras pa diskuillet deza eur fazi pe eun den ka-

bluz, a lakaë eun dorn war eur skouarn en eur lavaret : eur skouarn roan dan tamaller, eun all a viran evit an hini zo tamallet. An aotrou Doue zoken, petra bënag na neuz netra kuzet oud'ha, n'en deus ket teurveet barn Adam araok beza he glevet, ha gret deza anzav a oa kabluz.

3. Eun ober ec'h ell kaout meur a du, eme sant Frances de Sales; an den mad a gemer bepred an tu gwella, an den fall a zel an tu muia dizoare.

4. Na varnet ket gand herr; rag re aliez an herva a c'houlo ar wirione. An hini a zell a dreuz gwer lived a well peb tra oll da liou ar gwer; mar eo ru ar gwer a wel peb tra ru; mar eo melen, peb tra zo melen. Hon her-ni eo hon gwer. Mar plij eur re dimp kement zo

enna zo mad ha didamall; mar displij dimp neuze na zo vad abet enna; oll a gemeronp a wal berz.

5. Na varnit ket diwar zoare; ar belek Heliaz a grede Anna, feumelen zantel, trec'het gand ar gwin, epad, ar pezh a zeblant meventi enni, a zo birvidigèz ha karante Doue. Judith, merc'h koant ha leun a c'hened en tellou ar zoudarded, karet mad gand Holofernèz, a seblante beza eur vreg gadal; ha neuze koulz goude na oa merc'h abet muioc'h glan eviti.

6. Gwir eo ezuz barnidigez faoz heb beza diabet, na beza pec'hed dre ennon; abalamour en gwirione ho deuz an apparanz evito. Ar gwella eo na nem nec'hi kamed evit ar pezh na zell ket ac'hanomp, ha lezel Doue da varn.

7. Dibaot meurbet eur c'hris-

ten mad a rafe eur varnidigèz diabek, da lavaret eo a varnfe he neza, a dra zur, heb kaout rezoniou mad evit-ze; peurlieza n'en deuz diwar he ben nemed sonjou pe doan, hag evit-ze neo ket ret kaout rezoniou krênv.

8. Aotreet eo sonjal, pa zell an dra ac'hanomp en eur fezon benag. Na deurveont ket beza war evez gand doan da sonjal drouk, ha neo ket vertu, mez dievezded ha mank a spered. Ar garante ghristen a zifen sonjal drouk, hogen na zifen ket evesaët ha diarbenna.

9. C'hoaz eo aotreet sonjal hag a wejou zoken ret ober, ispisial dan dud a neuz real didanne, evel da eun tad, da eur vamm e kever ho bugale; da véstrou e kever ho servijerien, pa zo leac'h da welet an drouk bremâ, pe da diarbenn

eun drouk ec'h elleur douja en gwirione.

10. Tra all eo sonjal a ve gallet ober an drouk, ha tra all sonjal ezeo gret. Na neuz pec'hed abet ho sonjal ec'hellfe an drouk beza gret; kaout refet en eur c'hoat eun denn hag eur fuzul gand'ha; eur chasseur vezo. Hogen o sonjal alfe beza eul laër, en em laket war evez.... An dra-ze neo bet biskoaz pehed, rag sonjal ret ar pezh ell beza gwir, heb kridi a ve gwir koulz goude.

11. Na lekeat ket ive kevret an disfizianz hag an aon; an aon pe an doan a zo ennomp hep ma vemp kiriek, ne ma ket en hon gallout he harz. An disfizianz a zo en hon bolante hon-unan.

12. An disfizianz a heuil peurliezo an dud doaniet, aonik ha

melkoniuz; an disfizianz diabek zo-ken, na neo kamed pec'hed, keit ha na deu ket barnidigèz : bezet aliez en ho spered ar reiz-ma roët gand sant Augustin : « An drouk na anaveomp ket, ha na roomp ket hon aotre deza na neo ket eun drouk e gwirione, da lavaret eo eur pec'hed. »

DROUK COMZEREZ HA COMZOU INJURIUZ

1. En meur a skol ebarz ar bed a tisker komz er vad; en skol Jezuz-Christ heb-ken e tisker tevel er vad, en koulz. Mar disket tevel er skol-ze, a tiskot ive enni komz er vad, da-lavaret-eo komz evel ma c'houlén ar garante evit an nesa, ha dre ennon en em ziwall ouz an drouk komzerez.

2. Drouk komz, drouk preseg

eo : 1^o tamal dan nesa eun drouk neo ket gwir; 2^o kriski an drouk a zo gwir; 3^o disoloi an drouk/kuzet hep ezom, pe heb vad abed. 4^o trei ar vad en drouk; 5^o nac'h, kuza pe bianat ar veulodi a delit an nesa.

3. Em voazet da devel war bue ar re al en treou na zellont ket ac'hanoc'h. N'hon euz nemed re da ober ganimp hon unan, ha gand hon diabarz, spered heb huala hon teaud gand ar pezh a zell ar re al, setu eul louzou mad evit pellaët an drouk komzerez.

4. Pa c'houlennaz sant Per, dre *gurioste*, petra deuzie sant Iañ da veza, a roaz Jezuz ar respontanat-ma : « Petra zell an dra-ze ac'hanoc'h ? evidoc'h-u heuliet ac'hanon, *quid ad te ? tu sequere me*, Perag en em vouta en treou na zellont ket ac'hanoc'h. Sonjet ma

heulia ha netra ken. » Lavaret an dra-ze dach ho unan, pa dougo ar gurioste ac'hanoc'h da spia ha da arvesti, pe *gontroli* oberou ar re al.

5. Na veet ket koulz goude evel an dud simpl-se, pere, dre eun doan re vraz rag an drouk komse-rèz a gwenn an oll faziou hag an oll dud kabluz. Pa zeo anaveet ar faziou hag an dud kabluz; pe, ha pa na veent ket anaveet c'hoaz, mar g-int tu a behed evit an meou mad ha glan eo ret ho disoloï. Evit-ze lavare sant Fransez de Sales : « Krial war ar bleiz zo karrante evit an denved. » An hini a wel gwasta he nesa é kuz, a dle krial war al laër, ha lavaret deza petra dle ober evit harz. Gand brasoc'h abek aller krial war ar re a glask en kuz lemmel ar glanded.

ho wasta, ho walla ar greden pe ar vuegez.

6. Ar rezev a bec'h ive c'hoaz a drouk komz gand drougiez, hag ar re chilaou gand plijadur drouc a komz. Ma neuz ken disheveledigez etreze, eme sant Bernard, nemed homa : an hini a drouk komz a neuz an diaoul war he deaud; hag an hini a chilaou gand plijadur a neuz a neza en he diwskouarn.

7. Lavaret em euz an hini a chilaou *gand plijadur*, rag mar klevet hep kaout mad neuze na roet ket ho aotre, ha dre ennon na behet ket.

8. Mar neo ket gwir ar pezh a damall ar gwal deaud da neza nac'het an; mar eo kuzet an drouk, pe mar kresk aneza, ezaët disablant trei ar gaoz war eun dra benag all; pe autramand kemeret

eun neñz dic'hoarz; pe tavet krén,
diouz ma c'houlén an dud, an
amzer hag al leac'h. Ouspen, an
drouk ec'h ell beza anaveet
aoualc'h ha gwir, evit noc'heuz
klevet ghir diouta. Neuze an hini
a gomz na bec'h ket, a c'hui neo
ket ret dac'h he difazia. Euz an
tu all, pa na ouveet ket a dra zûr
a lavar gaou, na dleet ket drouk
sonjal euz ho neza ha kridi eo
gaouiat, pe a tiskuil eun dra ku-
zet.

10. Neo ket ret dimp tamal an
drouk komzer nemed esperanz
vad hon deve a chilaouo ac'ha-
nomp. Na roer louzou dar c'hlan-
vour nemed pa ve esperanz a rai
vad deza.

11. An injuriou pe kunuchen-
nou, an dismeganz, an disprizanz,
a zo kerliez a doare da rei taol ar

maro dar garante; evit-ze lavar
dimp ar Speret Zantel : « Evezaët
» na behfec'h gand ho teaud, gand
» aon nelfe ket ho kouli beza pa-
» reet (1). »

12. An hini a vlez an enor pe
ar vrud vad, a zo goaz evit an hini
en em gemer ouz an danve; na
vezo ket pardonet, mar na rapar,
ho c'hallout he ober, ar gaou en
devez gret.

13. Evezaët ouz ho teaud eta,
hanvet gand an aotrou sant Jac-
kez eur bed a behed; *universitas*
iniquitatis (2). Nankouat ket ken
nebeud ar gomz vad-ma lavare
sant Bazil : « an aotrou Doue n'en
» devez laket harz abet dirag hon

(1) Eccle. 28. 30.

(2) Jac. 5. 6.

» diw skouarn, evit ma heljemp
 » klevout ezet; dal lagad en deveuz
 » roët evit harz, daou groc'hen;
 » dan teaud en deveuz daou harz
 » krenv meurbed, ar muzellou hag
 » an dent, evit ma anavejemp er
 » vad an ezom braz hon euz d'he
 » evezaet. »

14. Leket evez koulz goude ne
 ma ket ar vertu o tremen heb
 komz, anez, a vize an dud mud ar
 gwella tud; ar vertu eo komz evel
 ma tere, da-lavaret-eo elec'h ma
 tere, pa dere ha gand neb a dere.

15. Prezegennoù war dreou
 nint na vad na drouk, a vag an ere-
 digez vad, hag he hell dre ennou
 beza gret evit Doue. Ar c'homzou
 didalve barnet gand an aviel nint
 ket ar memez tra.

AN ALUZEN.

1. Perag eta era an aotrou Doue,
 tad an oll dud, ma teu war an
 douar lod er baourante, ha lod
 all en kreiz ar madou? Abalamour
 ar bed o veza gret evel ma ma,
 ezeo ret an daou rumm tud ze, a
 lavar sant Augustin, evit he der-
 hell en he sav. E gwirione, mar
 na vize ket a dud ezomêk ebarz ar
 bed, na vize ken na labour, na
 micher, na skianchou, na sentidi-
 gez, na gourc'hemmen. A c'hano a
 weler ezeo ar binvidigez hag ar
 baourante, an diw-vrec'h a unann
 an dud war an douar.

2. An Tad *selestiel* na neuz ket
 ankoueet evit-ze he vugale baour,
 ar pezh a garr ar muia; pa neuz
 teurveet a teuze he vab he unan,

da c'henel, da veva ha da vervel er baourante.

3. Evel ma pourve da sec'hder an douar gand ar glis hag ar glao a goëz euz an env; er memez doare a pourve da ezomm ar beorien gand diouër ar binvidigen. An hini a rann he diouër gand ar paour, na raket eun donezon deja, paëa ra eur dle; dle a behini a neuz karget aneza an Doue mad, tad eveziek ha mestr oll c'haloudek ar paour hag ar pinvidik.

4. Bez euz daou seurt diouër : unan, kement zo en tu all dar pez zo ret evit beva; egile, kement zo en tu all dar pez hon euz ezomm herve hon stad. Ar c'henta a dleomp d'hon neza en he ezomm diveza; an eil en he ezomm pem-deiek, ha kentoc'h c'hoaz mar be braz he ezommo.

5. Pebunan he devez gwirdaveva velma tere d'he stad; mez meura dra ec'helleur lavaret war an de-readegez-ze; o tispign kalz mui evit na zo ret, a kaveet c'hoaz ec'helfec'h dispinn ouspen, hag o tispinn nebeutoc'h a vec'h c'hoaz en ho renk.

6. Diez meurbet eo lavaret pe-tra ec'hell peb den diouëret; an dra-ze a dalc'h da var a dra. Ar gwella eo heulia ali sant Thomaz; em reiza war lavar eun den fur ha poëllek.

7. Tra gwirion eo koulz goude, ec'h elleur zellet evit diouër ar pez na neo ket ret evit beva evel ma tere en hon stad, gand ma selleomp ar stad-ze evel ma tle christenien ober, rag eun ine mad na ell kamed mont eneb, heb remorz.

8. Meur a dud pinvidik a gaver ha n'ho deve kamed netra da diouëret en ho stad; rag ho dispinioù braz a lonk ho danve oll. An hini a neuz c'hoant beva evel falz-pinvidik an aviel n'eh devezo kamet eun tam bara, paz zoken eur vruzunen evit Lazar

9. An heveleb pinvidigen a laka da netra ar gourc'hemen braz euz an aluzen, hag ez int *koupabl* euz eul laëronsi braz, ho sakrifiad d'ho *ambition* dall ha direiz, ar pezh a c'houlenn Doue digant-ho evit ar beourien. Tertullien a hanve anezoù pinvidigen ken-souket pe bredestinet evit an ivern, dre eneb ar binvidigen aluzennuz a zo predestinet evit ar baradoz. Evit ar paour, hent an env eo ar zoufrançou, evit ar pinvidik, eo an aluzen.

10. Miret eur somm resonapl

evit an darvoudou, peur liesa ar re al erru er vue, neo ket berna diouër, mez heulia al lezennou euz ar furnez. Peb boëd a dle kaout hollen enna, ha peb vertu beza reizet gand ar furnez ha kent preder.

11. An dra-ma a zell ispisial ar gerent a espern evel ma tere, evit rei d'ho bugale eun diskadurez zantel, hag evit argouraoù pe *dota* ho merc'hed herve ho renk hag ho danve. Kement-ze neo ket berna diouër, hogen pourvei dar pezh a dleer : rag an diskadurez-ze hag an argoulou-ze a zo eur gwir lealded evit ar gerent hag evit ar re a neuz ho c'harg.

12. Hogen evit beza ken preder e kever he vugale, neo ket red beza didrue e kever ar paour. Ar gwella, ar c'haëra madou ouffac'h

Iezel gand ho pugale eo beza karantezuz. Tud an den aluzennuz a vezo bepret biniget gand an Doue a c'hourc'hemen an aluzen.

13. Gourc'hemen an aluzen na redi ket ac'hanomp da disken euz hon stad. Ar vertu, evel m'hon euz lavaret er penn kenta gand sant Augustin, a zo an urz vad. Ar pezh eta ne ma ket en urz, neo ket vertu.

14. Tud ezo, hag evit ober aluzennou brassoc'h a vank dan anaoudegez ha dar largente en kever ar re neuz roët dezo sikour ha madelezou; gwal zoare pe *illusion* eo an dra-ze; ar vertuziou a zo a unan hag en hem glev, hini na c'houlén ar pezh zo dleet d'he benn.

15. Na lekeet ket en ho penn a ve ret dac'h soulaji an oll ezomou;

an dra-ze ne ma ket en ho kallout; pa oc'heus roët ar somm aluzennou a dere ouz ho tanve, war lavar eun den fur, oc'heuz gret hol lead é kever an aotrou Doue hag e kever ho neza, hag ec'h ellet beza en peuc'h.

16. Ret eo evezaët er fad da biw rei an aluzen : nouffet ket lavaret pegement a dud a ra neuz da veza paour, pe a gresk ho ezomm evit beza zikouret. Bezet eta divalo da gridi, hag evezaët da rei, evit ma tío ho aluzenn beteg ar gwir ezo-mek, ha na goëzo ket en dorn an ipokrit, evel ma tigoue meur a wech. Ma vize darnouët mad an aluzennou oll, na vize ket kerliez a dud gwir ezomek. Meur a denn, evit harz ne veent tromplet, en eun dra ker diez, a garg ho fersonet pe ho c'hovezored, da rei ho

aluzennou. Ho c'harg a ro dar re-ma tu da anaveout ar re ezomek en gwirione.

17. Miret mad en ho spered an ali roët gand ar zent : « an hini a » neuz kalz, a dle rei kalz ; an hini » a neuz nebeud, roet nebeut, hag » an hini na neuz netra, beet » c'hoant gand-ha da rei, ma alfe, » rag dirag Doue bolonte vad an » hini a ro a dal mui evit ar pezh a » ro. Diner an intañvez a neuz plijet mui dan aotrou Doue evit » profou braz ar binvidigen or- » gouilluz. »

18. Karet ive an aluzen *spirituel*. Eun ali fur, eur ghir mad evit rei kalon ; konfort roët en koulz, eur vizit grêt da eur c'hlanvour, skoa roët da eun intañvez, dan emzivad, dan den dilezet, pe eskinet, a zo kerliez aluzen, hag a dall zalvui

dirag Doue ma-zint peurlieza gwelet nebeutoc'h gand an dud.

DLEADOU AN DENN EN GERENAL.

1^o An den ebarz ar bed na ell ket aneza he unan pourvei d'he ezomou kenta. Ezomm e devez zikour digand ar real evit beva ha kriski. Ar pezh a ra gwelet skler ezeo bet krouet da genta evit beva kevret gand re al.

2. Ebarz ar zoziete ez-euz dleadou a veur a doare, ha peb hini a neuz he reiz deza. Ar reizou a neuz an dud kevret en gerenal, na nint ket ar memez re hag ar reizou etre tud ar memez kerentiezh ; pe c'hoaz zoken ar reizou a neuz an dud gand-ho ho unan. Ar re genta a hanvomp dleadou gerenal, abalamour ma zellont an oll

dud ec'h ellomp kaout eun dra benag da ober gand-ho. An eil re a hanvomp dleadou a gerentie; abalamour na zellont nemed ar gerent, pe tud ar memez ti. An drede hanvomp a'unan pe *privet*, abelamour na sellont nemed eun nebeud bian a dud.

3. Ar dleadou *gerenal* a disk dan den kaout resped evit ar re zo uhelloc'h evita, dousder pe habaskded evit ar re zo pâz deza, ha madelez evit ar redisteroch evita.

4. Ebarz ar *gonversation* hag a zo eun diver emzer honest, peb unan a dle ober anezi dizoanniuz, a nez na ve ken diver-emzer mez eur zamm.

5. Evezaët eta da gomz na re, na re nebeut; ho tebren da'gomz bepred a rai na vezzet zellet evel eun den rog, pe evel eun avelek;

tevel re, pe gand chif, a rafe kridi na blij ket ar kevredigez dac'h.

6. Ar furlukinerez a zo binim ar *gonversation*; eneb eo dar furnez c'hristen, dan dereadegez, dan honestiz, ha dar zevenedigez zoken. Meur a dud a garfe tremen evit tud a skiant, ha na ouveont nemed likaoui ar c'hik; kridi reont beza filozofed, hag ho filozofi na anave nemed al likaouerez.

7. Ar medezin evit anaveout stad ar c'hlanvour a zell he deaud. Zellet ive, evit he anaveout, teaud an hini oc'h euz zevredigez gand-ha : Mar eo louz ha lik he deaud, pa gomz, he galoniez na ell ket beza clan. An aotrou sant Jakes a disk dimp ez eo tommet an hevelep teadoud gand tan an ivern. Ha David a hanv anezo beiou fleriuz a

wast hag a gontamm an er vad. Pellaet diouz-an teadou fleriuz-ze, c'hoaz gand brazoc'h aket evit diouz tud gouneet gand ar vossen, rag brasoc'h drouk eo koll an ine evit koll ar c'horf.

8. Ebarz ar gonversation, klesket ober plijadur ha nan gwalla. Evezaët eta na gemerac'h ar c'hiz-ze ken kazaüz a faëzer, a tenzer, a c'hogeer, a fougere, a skanv e benn.

Faezer, a neuz neuzion mestr, hag a gred a tle an oll tevel pa gomz.

Tenzer a damall oberou ar re zo diraza, hag ar re ne maint ket, hag a gemer heskin evit an distera tra.

Gogeer, a glask ober c'hoarzi diwar goust eur re, pe *abus*. euz *simplisite* ar real.

Fougere, aneuz dalc'h mat en he c'henou, he skiand, he oberou pe re he dud koz.

Skanv-benn a dro aliesoc'h evit an avel vor. Brema karadek, *aimabl*. ha c'hoarz oll, neuze zouden garo ha kudennek. An dud a neuz eun hevelch tempz a ra ar gonversation inaoüz ha dizeread.

9. Ober dar real ar pezh a garfemp a ve gret dimp; na ober ket dar real ar pezh a ziplic'h-fe dimp; setu ere ar gevidigez oll ha mad braz peb konversation.

DLEADOU A GERENTIEZ.

1. Ar gevidigez famill a zo muioc'h dellitez c'hoaz evit ar gevidigez en gereal, rag muioc'h a sell ouzimp. Kri eo kaout ar memez taol, ar memez ti, ar memez

kerzou, interetzou, ha na gaout ket ar memez zantimanchou er galon. koulz goude e kaver meur a denn amgraüz ha deread e kever ar real, hag a zo rog ha kudennek en kever ho zud.

2. Pell diouzoc'h eta ar si vilze; ar famill ar muia pinvidik a vezo deseier, mar na ren ket ar gen-garante-ze en he zouëz. Hebzi na vezo nag urz vad en ti, na kaloniez, na brud vad, na bennoz an aotrou Doue.

3. Lekeet etaho sevri oll evit miret ar peuc'h-ze, mar oc'heu-zi brema; evit he c'haout en ho ti mar ne man ket. Ar garante, an drue, an evez, an urz a zo doareou krenv ha gwirion evit tiout eur vad ken talvoudek.

4. Karet, a lavare an aotrou sant Augustin, ha gret neuze en ho ti

ar pez a garfeet; kement alio ar garante ha c'hanoc'h ober a vezo dalc'hmad aimabl, karadek. Mar karet ar re al, c'hui vezo karet d'ho tro, ha gand ar gen-garante-ze an inivaniez vezo er galon hag en oberou.

5. Etouëz ar famillou gwella vezo kavet kevredigez, rag eur gevredigez tud int ha nann eled. Ret eo eta kaout true an eil euz egile, anez eur blouzen a deui da veza treust, hag eur c'hoezaden avel, eur barr amzer noazuz braz. Ar re al em ra diouzoc'h em c'hret ive diouto. Eur gaoz koz a lavar: *Neb a gar beva peuc'h, a wel, a glev, hag a dav.*

6. Evesaët na lavarec'h neb riot, na fougeerez flemuz; an treou-ze na dereont ket en kever diavezourien, nebeutoc'h c'hoaz e ke-

ver kerent. Na lavaran ket dac'h ober dilez euz ho kwirious; nann, lavaret ran hebken, na vennet ket kaout gwirious pere a goll ar peuc'h a zo eur vad ker braz, na ell ket beza prenet re gerr.

7. Pellaët diouzoac'h an dud a danevell dac'h komzou hag oberou tud ho ti, hag ouffe sevel drouk ennoc'h, ha rei tu da drouz, an hini zo fall aoualc'h evit danevelsiou ar real, heb m'en deve karg evit-ze, a zo ive fall a oualc'h evit aoza gevier. Hag en gwirione, mar zellet piz ous ar pezo zo bet lavaret dac'h, a kavfeet anezo pe gerou krenn, pe gwassat en doare nint ket ar memez tra.

8. Aliez a tigoue, pa ve er memez ti servijerien hag a nefe peb hini he vestr, a klaskont, dre erêz, ober kridi d'ho disfizianz pe gres-

ki an drouk anaveont. Na gredet ket eta buan dezo, ha bezet c'hoaz muioc'h divalo da varn. Biskoaz an dorfetourien anat na nint bet barnet a raok beza gret ho frosez.

9. An drede doare evit miret ar peuc'h ebarz ar famill, eo evez ar mestrou war ho servijerien, ar gerent war ho bugale, an ezeac'h war ho grage.

10. Ar mestrou a dle evezzaët war reiz christen ho servijerien, ha mar kavont anezo boazet fall, ter ha rioter, o c'haz kuit timat; a nez ha tarzo sparlou a vern ebarz ar famill, kavet vezo lizeregez ha displeaded evit miret tra ar mest; ar vugale vezo troët diwar an hent mad..... Pet gwech na neo ket bet kiriek eur vatez direiz da lakat an dizurz er famillou mad hag enoruz, betek ma roënt skouër

fall da dud an ti, ha ma vijent goapât gand an dud diaves! Pa ret an dibab euz ho servijerien; bezet gwel gwenac'h kaout nebeutoc'h gwenved, (habileté) ha muioc'h a zevotion hag a furnez; eur servijer fall a denn gwalennou an aotrou Doue war zi eur mestr mad zo ken.

11. Karet ar servijerien mad ha gwen, kapabl, sikouret-ho en ho ezomou, mez na roët kamed ho kred dezo, heb dale a teufent rog, nebeutoc'h sentuz evit ho urzou, faëuz evit ar re al, hag ac'hane droug euz ar mestrou hag ar servijerien. An dud eb diskadurez a a abus, a ra gwal ober abred euz madelez, ha dilez ar re neuz veli warnezo.

12. Ar gerent a dle evesaët war ho bugale, kelenn aneze war

ho religion, ho gwelaët euz ho siou, hag ho sturia dar vertu dre ho skouër vad. Ar vugale savet fall a zo en krez ho zud, ha dre ennon eur c'hrizien a c'hlac'har evit ho familh.

13. Neo ket mad beza re c'harv gand ar vugale, gand aon da walla ho spered ha d'ho egazi heb abek; mez neo ket mad ive beza re vad ha re garantezuz gand aon na veent re hardiz ha re digabest. Heliaz a zo distaolet gand an aotrou Doue, evit beza kenteliet re nebeud he vugale direiz.

14. Tamallet, teuzet gand ar brasa evez, siou ho pugale vunud. Ar gerent peur liesa na roont evez a bed dezo, abelamour ma zellont anezo evel tra a deu demeuz ho pleg, ha deuz ho oad forz iaouank. Hogen Tertullien a lavar mad

ezint boëden a bec'het, hag a diougan ar pezh a woint goude. Ar spern, pa ve o taoll, na vroud ket; hag an aër ho c'henel n'he devez binim a bed; mez a bep ma teu he oad a kaleta he broudou hag an aër a gemer binim a peb ma kosa. Ar gerent re vad evit ho bugale iaouank na nozont ket nebeutoc'h dezo ho unan evit d'ho bugale. Salaün lavar a teu hevelezh bugale da veza leoned feroz, evit ar re zoken a aneuz roet dezo bue ha danve. Teurveet mad gwelet redek daërou ho pugaligou iaouank, evit goude beza bet kastiet euz ho gwal faziou, na raint ket redek ho taërou c'houi hed ho pue.

15. Evel ma-z-eo an deillou, ar bleu hag ar freuz dastumet en eur c'hreunen vian a had; er me-

mez doare boëden ar vertuziou hag ar visou azo kuzet en kalon ar vugale. Oll vad an diskadurezh eo maga ar vertuziou ha dischriena ar visou.

16. Miret dalc'h mad ha gand furnez ar veli enoruz-ze a dad a neuz roët an natur ha gourc'hemmen Doue dac'h war ho pugale, en klasket er vad an tiez, ar gevredigezh a darempredont; al levriou lennont hag ive ho labourou, evit pellaët enezou diouz ar pezh a zo tamalluz, hag atiza dezo ar vertu ha kement a dere.

17. Miret ho peadra gant espern, pa neuz lavaret sant Paol a tlefoa an tadou tenzoria, da laret eo espern, evit ho bugale, gand aon na deufent da goëa euz ho renk, nann dre faillagriez ho enebourien, hogen dre lizeregezh ha dispennou direiz ho c'herent.

18. Na espernet netra kouls goude pa vezo ret rein eun diskadurez vad d'ho pugale, hennez eo an danve gwella oufac'h lezel ganto. Dre diskadurez vad a fell din lavaret eun diskadurez a ra tud iaouank devot en kever an aotrou Doue, mad oberuz evit an nesa, chast, aketuz, gwiek, modest, filosofed larg ha gwirion, evel matere beza peb gwir ghristen, ha peb denn mad a garr he vro.

19. A nez ec'h ellont beza nobl marteze dre dellitou ho zud koz ha disenoret dre ho bue direiz. A hent all ar skiant, ar gwiegez na dalveont da netra, mar na nint nerzet gand al lealdedt. Ar malheuriou braz koeet war an tiegezou, war ar vro, war ar stadou a zo deut a beurz tud gwiek meurbed, mez brein a galon.

20. An ezezh a dle evesaët ho gragez evit pellaët diouto ar gevredigez-ze re vraz hanvet gadalez, hag a laka ken aliez an dizunion e tiegezou. Houma gouneet gant kaloniez direiz a zo diseblant evit tra he famill, evit diskadurez he bugale; ne deuz ken sonj nemed plijout dar re glask he likaoui.

21. Ar briedelez, herve sant Paol, a zo eur skeuden euz an unvaniez a zo etre Jezuz-Christ hag he Ilis; na dle ket eta beza saotret gand ar garante, na ve nag honest, na deread evit priedou.

22. An ozac'h eo ar chef euz an tiegez, ha dre ennon euz ar vreg ive, mez peb galloud a neuz he reiz; ar vreg he deveuz he dleadou e kever he fried, hag an ozac'h e kever he vreg. Eur pried

fur ha leal, a roïo d'he vreg ar
pez a dere ouz he stad.

23. Evesaët ouz an doareou
garo ha kri. Eva, hon mamm
genta, a lavar dimp sant-Thomaz,
neo ket bet tennet euz a benn
Adam, evit diski dimp na dle ket
ar vaouëz rena an denn; na deuz
he droad, evit diski dan denn na
dle ket ober eur sklavez gand-hi,
nag he dere'hel didan gabestr.
Hogen tennet eo bet euz unan
a gostou Adam, da lavaret eo euz
al leac'h nesa dar galon, evit la-
varet deza ha da rumou war he
lerc'h, ar garante vraz hag an
unvaniezh a dle renn etre grek hag
ozac'h.

24. Ezech'h, bezet evitho kragèz
eur garante hag eur vadelez ner-
zet war ar vertu; ha c'houi, gra-
gèz, sentet a galon vad euz he

ezec'h, neuze reno ebarz en tiegèz
karante ha reiz vad.

25. Evit mad an tiegèz a ve
mad reizha heur ar prejou, an affe-
rou, an diverr-amzer, an dispin-
nou, ha kement a zell ar famill.
Heb urz na ren ket pell ar peuc'h
en eun ti. An oll kouls goude agar
ar peuc'h-ze, hogen nebeud a
deurve ober ar pez zo ret evit he
maga.

DLEADOU SPESIAL PE A VISMONAICH.

1. *An hini a neus kavet eur gwir
vignon, a neus kavet eun tensor tal-
voudus, a lavar ar Spered-Glân.
Ar bayanet fur soken, a lavar
dimp sant Thomaz, a zisk ez eo
ret, evit tanya an eürusdet dister
a gaver ebarz ar vro-mâ a harlu
pe a exil, kaout eur gwir vignon.*

Hon c'huzuler eo, hon c'honfort, hon mad oberour, eun eil hon-unan. Argarante ara peb poan skanv evita; brasoc'h plijadur a gav oc'h ober vad d'he vignon, evit na gav hema a dudi o kemeret ar vad-ze.

2. Hogen kement a maz-eo talvouduz ar vignonaich gwirion, kement all eo dibaot. Daou c'hano a gwaller ispisial en emzer brema; an hano filosof hag an hini mignon. Hanvel rear *filosof*, da lavaret eo den a garr ar furnez, an hini zo froudennuz en he gondou, dic'hraz en he fezonion, diskridik en he lavarou, skanelard en he oberou. Hanvel rear *mignon*, ar re vezeur em gavet gand-ho ous taol, o vale, en diver-amzer, er c'hoariou, en ebatou.

3. Ezetoc'h meurbet e kaver

eun denn honest, hag eun denn karantezuz evit na gaver eur mignon. Peb gwir vignon a dle beza denn deread, mez peb denn deread neo ket eur mignon.

4. Ar gwir vinnonaich a c'houl-len doareou all; na lavareomp ne-tra dioud-ho evit troc'ha berr. 1^o Eur vue didamall; 2^o intentionou, menozion honest; 3^o hevelidigez eveziek. Gand an doareou-ma eur minnonaich ec'h ell beza mad, etre goaz zoken ha maoëz; rag an aotrou Doue, tad an oll, n'he deveuz ket laket an hanter euz an dud e stad a vrezel eneb an hanter all; a nez a iafe eneb deza he unan.

5. Ar c'henta doare evit eun *amitie* gwirion eo ar vue dinam. An *amitie* pe ar vinnonaich, eme sant Jerom, a sav etre tud hanval,

pe o laka da veza hanval heb dale pell; setu perag na henter ket pell eun den difeiz, heb kaout lod en he fallagriez. Ar gaoz-ma a oa anaveet gand ar baganed fur : *Lavar din piw eo da vinon, ha me lavaro dit piw out* : Buan, ec'hana-veer tempz eun denn dre dempz he vignon.

6. Eur mignon ganaz, evel eun den direiz a zo goaz evit eur falz moneier; hema noaz heb ken d'ho tanve epad ma laka ar re genta ac'hanoc'h en riskel da gaout kollou a bep tu, hag a peb doare. An hini gav eur minon ganaz, a tigooue unan euz ar braza gwallou gand'ha, ha sal vrazoc'h, ma he douger ha ma he anaveer nebeutoc'h. Eun den fur euz an amzer goz, e devoa ar c'hiz da lavaret : *Me ma unan a laka eves ous ma*

enebourien, mes Doue heb ken ec'h ell ma miret ous ma minoned ganaz pe faos. Gwallet eo eta an hini a guzul dac'h an drouk, pe a veul ac'hanoc'h pa ret tra tamalluz; eur ganaz, eun traitour eo ha nann eur minon. Ped a gaver hag a neuz evit minoned tud heb religion, heb furnez, heb tempz vad. An dud reuzidik-ze a zo en brassoc'h riskl da veza tromplet, evit ar verdidi da veza tiet gand barrou amzer.

7. Neo ket aoualc'h a nefe ar vinoned bue dinamm, ouspen a tleont kaout abek eun. Em garet a dleont, nan evit eur gonid disster, pe eun deneridigez damantuz, mez evit ar stad aro dezo an eil evit egile, ar vertu, ar galonie hag ar memez pleg.

8. An dud pinvidik ha bras evit

an darnvuia, an euz endro dezo, tud skarz (venales), hag a c'halver dre sotiz minoned; rag na nint nemed minoned an daol, ar vad hag an harp aro dezo eun heveleb minonaich. Na welont ket an dra-ze rag ar monei faoz a lugern mui evit an hini mad. Al lorc'h-ze a dall aneze brema na bado ket pelloc'h evit ho eürusdet. Boëse, he unan, ar filosof-ze ken gwiek hag anaoudek, na anaveaz al lorc'heien-ze nemed goude beza koueet en reiz. Neuze, goude beza kollet grad-vad ar Roue, a skrive glac'haruz euz he bac'h pe brizon : « brema ec'h anavea ar minoned » ganaz, ar chonzul a garent, ha » nann Boëse; dem fortun a re » vad dezo a oant minoned, ha » nann din-me. »

9. An amitie azezet war ar

vertu, a bella ive an deneridigez riskluz-ze a deu euz atiz ar c'hik : Komzet hon euz diout-i en doare da garet hon nesa. Heveleb kalonieze a zo hanval ouz fleurieu, evel ma lavar ker mad *Sidoine Apollinaire* : Ar fleurieu na blijont nemed kentre ma veont fresk, ha c'huez vad gand'ho; aboan e tizec'hont ho stlapomp pell diouzimp.

10. An doare diveza evit eun amitie gwirion; eo an evez-mad en darempred; ar re vraz karante, ar farzou direiz, ha kuzulieu all a dizolo kentoc'h eun ine douget dal likaouerez evit dan amitie. Heveleb doareo zo kement eneb an amitie gwirion, evel ma man tevalijen an noz eneb sclerijen an deiz

11. Evit miret na vec'h tromplet re aliez eta, kent evit ober dibab euz eur minon, gret tri zra mer-

ket gand *Ciceron*, ha kavet mad gand sant *Augustin*. 1^o Zellet hag en zo e den-ze an danve merket evit ar gwir amitié; 2^o Gouveet hag en ec'h elleur fiziout enna, izpizial ebarz ar pezh a zell e vad he unan; 3^o Neuze ec'h ellet he gemeret evit minon gand ma kreteet mad koulzgoude, ez eo ar gwir vinon an dra ar muia dibaot zo er bed; hag ez eo dallente kridi ec'h elleur he gaout ezet; hag a laka kevret ar minoned gwirion hag ar vinoned ganaz.



.....

DLEADOU EN HON C'HEVER-NI.

III.

Ar dleadou en hon c'hever-ni, a zo ken niveruz, ma ve enoëuz komz a dû a peb hini a neze oll; ar genta eo all labour, an diverr-amzer, an dillad pe ar gwisk, ar vadelez pe ar berfekzion, al liberte hag ar peuc'h a spered; kemeret kement erru ganemp evel deut digand an aotrou Doue.

LABOUR PE BREDER.

1. Adam, en he stad dinamm, a oa bet laket er barados terrestr

evit ober eun dra benag, o labourat ar jardin dudiuz-ze (gen. 11. 17.) An douar-ze ken froëzuz, eme an aotrou sant Chrisostom, n'he devoa ezom abet da veza labourer, mes Adam he devoa ezom da ober eun dra benag; rag ar lizeregez a vize bet marteze evit he c'lhandedt, brasoc'h tu a bec'hed evit an aër. Al leziregez eo penn ar visou, evel ma zeo al labour penn ar vertuziou.

2. Al labourou dle beza diouz hon stad; kemma dleont diouz an darvoudou; peb labour na dere nag en peb amzer nag en peb leac'h.

3. Na veet ket euz an dud-ze, pere evit ober eun dra benag a lenn levrou fall, passion vraz an dud brêma; hag ac'hane kement a bennou follet. Al labour-ze, eme

an aotrou sant Chrisostom, a zo goaz evit al leziregez he unan. Nerza ra, evit he kollidigez, passion krenva ha touëlluza an denn; ober ra marc'had gand an enebour a het muia d'hon gwall techou hag a hillig pe a flatt a nezo. Ac'hane a teu aliez ezomp kollet, pa gredomp, en hon dallente, ez omp treac'h.

4. Mar oc'heuz c'hoant lakat ho spered gand eur lennadur vad, lennet ha studiet al leoriou a disk dac'h dleadou ho stadou gerenal ha spesial, a denn, a sitoyen, a gristen, a dad, a vab, a bried, a vestr, a vinon : Ar dleadou-ze zo braz meurbet; hogen ken dilezet, ma varv an dud, war an doare-ma, ken disc'hwiek, evel ma-z-int bet ganet.

5. Nankouaet ket leor braz an

aotrou Doue, da lavaret eo ar skritur sakr, a zo bet displeget dimp gand kenlieza den gwiek braz. Evel ma ve mezuz evit eur medesin, nanaveout ket levriou kenta ar vedecinerez, hag evit eun den ha lezen nanaveout ket kod al lezennou, mezuzzoc'h avé c'hoaz evit eur c'hristen, na c'houveout ket leor hon salver Jesus-Christ ha beza disc'hwiek war he fe. Euz al leorma a neuz kemeret ar filosofed pagan armaia anaveet, ar reizou neuz tennet warneze meulodi an dud; hag ar ghristenien genta o devoa studiet ker mad aneza, ma virent aneza en ho spered, nann heben an dud gwiek, hogen c'hoaz zoken al labourerien, ar vicherourien, hag an dud distera, hag a lavarent he gomzou sakr gand dudi braz. Lenn al leor sakr ma a skle-

rao ho spered, a reizo ho kalon, hag a brederio ac'hanoc'h en eun doare zantel.

DIVERR-AMZER.

1. An diskuiz hag an diverr-amzer a zo ken ret evel ar preder hag al labour. An hini, eme sant Thomaz, na c'houlén ket en em zivuz, a zo eun denn ec'helleur kaout aon diouta, hag eun den goue; en eur fillidigez braz a kouéz,

2. Evit ma vezo mad ha vertuzuz an diverr-amzer a tle kaout teir *gondition*; 1^o Bezo onest en he natur; 2^o Reizet mad en he *but* pe ratoz; 3^o Poëllet, moderet en he hed.

3. An diskuiz a dle da genta beza onest en he natur; na dle beza fall euz a du abet na disfennet

gand neb zeurt lezen, evel ma-z-eo an dansou, ha c'hoariou disonest; ar c'hoariou eleac'h na glasker nemet goumit; ha plijadurezou all hanval.

4. An divuzou a dle kaout eur but, eur rat; kemeret plijadur evit ar blijadur hebken, em amuzi evit em amuzi a zo tra demallet gand an Iliz. An tremen-amzer na dle beza nemet evit diskuiza ar c'horf hag ar spered. Ergis-zelavargand hetsant Franses de Sales, a ra ar beager skuiz; na baouëz ket evit paouëz mez hebken evit diskuiza, hag en em voëta, evit gallout heuil buanoc'h he hent.

5. Ar c'hentelher hanvet ha meulet gand sant Thomas, a lavar: nebeud a zivuz zo aoualc'h evit an denn, evel nebeud hollen a zo aoualc'h evit hilienna ar c'hik.

6. Beza eo ar divuz evel ar boëd; eur rumm a c'houlenn muioc'h, eur rumm all nebeutoch.

DILAD, TOELETEN.

1. Peder reiz roer war an drama; 1^o Hon dilad zere beza diouz hon renk ha diouz hon gwenn; 2^o Diouz hon danve; 3^o Diouz hon stad a vrek pe a intanvez a blac'h yaouank. Evit-ze sant Augustin a damalle eur vrek a deuree beza gwisket en du evel eul leanez.

2. An dilad a ziskouë renk an denn, mez beza eo ive evit miret ar gempenadurez, hac hon difen ra eneb an amzer. Eun drouk braz ve eta mont eneb an dereadegëz, gand an doareou soken a dalve evit he miret. Honnez a ve kablus

en em lakfe en tal da gaout riv betek noaz d'he iec'hed, war digare heulia gizioù roët gant ar froudenn, ar skanvder, pe gentoc'h gand eun diboël *ridikul*, na ell beza reizet na gand fe eur c'hristen mad, na gand rezon an denn zoken.

3. An denn devot Thomaz *Morus*, a lavare eun deiz da eur vaouëz en em lekee en tal da gaout riv evit noaz d'he iec'hed, heb ken evit tremen ar re al dre he c'hempennadurez, ha kinklerez vraz : « An aotrou Doue ve dis-
» leal en ho kever, mar no parn-
» fe ket dan ivern, o welet ac'ha-
» noc'h ker kalonek ha ker hardiz
» da kia ker braz diezamand, evit
» plijout dan diaoul ha d'he vino-
» ned. »

4. Mar karomp an enkreiz, ma

vezo reizet evit gloar Doue, ha dre ennon evit hon silvidigez, ha nann evit koll hon ineou.

KASTIZEREZ.

1. Eur fazi braz eo kridi a ve eun drouk, passionou an denn, er c'hontrel, reizet mad, ez int abek da vertuziou braz. An doare d'ho reiza er fad eo ar gastizerez. Ar stur a renn al lestr, ar morz a renn ar marc'h, hag ar gastizerez a reiz passionou an denn.

2. Daou zoare hon euz den em gastia, unan evit ar c'horf, eun all evit ar spered. Ar c'hristen a dle miret an eil hag he ben, evit beza hanval ouz hon Salver Jezuz-Christ, kef ar re zalvet.

3. Beomp koun, sonch koulz-goude na dle hon pinijennou ha

kastizerez pemdeiek noaz na d'hon
iec'hed, na d'hon nerz, a zo fiziet
ennomp heb beza tra dimp. Hon
c'horf, a lavar ken mad an aotrou
sant-Augustin, a zo eur c'hlanvour
reuzedik, erbeder da garante
hon ine. Peb ezom euz on c'horf
a zo ken aliez a bistik a dle ka-
rante hon ine para deza. Klevet
eta ouz ar c'horf heb ober zével
he bassionou, mez ive heb an-
kouat he ezomou.

4. Skwerjou ar zent a neuz gret
pinijennou burzuduz a zellit hon
meulidigez, mez neo ket ret dimp
heulia anezo.

5. Diwallet na ve ho iuniou ha
diouër, abek a vanite, a wander
evidoc'h; pe c'hoaz na zeufent euz
ho c'hoant pe euz ho karante re
vraz evidoc'h ho unan. Mar na
nint reizet gant an obeisanz na

blijont ket da Doue, evel m'en
disk dre c'henou Isai (38. 3). en ho
» iuniou en em gav ho c'hoant;
» *ecce in die jejunii vestri invenitur*
» *voluntas vestra* »

6. Mar o c'heuz c'hoant ober
kastizerez dinoaz evidoc'h, kaztiet
ho tiabarz; ar pez a refet, eme
sant-Bernard, o renonz d'ho po-
lonte *propr*; evit eun heveleb kaz-
tizerez na neuz digare abed. Mar
lavar an dac'h iun, a skrive sant
Jerôm, en eun doare all, ec'h ellet
respont din n'oc'heuz ket an nerz
evit-ze; pe mar lavar an dac'h
ober an aluzen, a lavaret no
c'heuz netra da rein; mez pa
lavar an dac'h renonz d'ho polonte
propr, noc'heuz digare abet ken.

7. Sant Felip-Neri a lavare aliez
d'he ziskibled : « Ma bugale, ar
» vue spirituel a zo en tri biz. »

Hag o lavaret an dra-ze a lakaë he vizied war he dall.

8. Ar reiz ken mad ha ken gwirion a heulie sant-Augustin, evit ar c'houëz vad, a zo mad ive evit ar skianchou all « ma spered, » emeza, ne man ket gand-ze; » mar na neuз ket, n'ho c'haska » ket, mar ez euz na dec'ha ket » diouto; goude oll ezet ho diouë » ra evit mad. »

9. Ar gastizerez eneb hon c'hoant, ha n'hon euz ket dibabet, evel ar c'hlenved, isu fall eun affer, an anvi, an dizprizanz, kemeret kalonet ha gand joa ar spered, a zo ar muian dilituz, abelamour ma teuont digand Doue, evit *malis* an dud da veza bet pen abek. David didan-gaz; flemmet, eskinet gand Simeï, a zele'haz *koler* leal he dud; o lava-

ret dezo a oa Doue a c'houe'hemenne da Simeï, milliga David.

PARFEDED.

1. Ar c'hristen neo ket rediet da veza parfed, mez a drazur da denna dar barfeded; da lavaret eo a tle poëlla ha lakat he oil aket evit kreski ebarz ar vertu, evel ma lavar sant-Chrisostôm, sant Augustin, sant-Thomaz ha sant Bernard.

2. War skeul Jakob, skeuden ar barfeded christen an eled a neuз daou zoare; epad ma pign eur rumm, eur rumm all a zisken, nikun na chom diflach, neb na bign ket a zisken, neb na dosta ket da Zoue a bella diouta. Ar bageer war ar ster vraz, na hell ket mont war-raok, eneb an dour, dre forз

ročnvia ha paollevia, a renk disken gand an dour-ze cneb ha perisa.

3. An doare da diout ar barfeded na eo ket da ober treou braz ha dibaot, mez da ober an treou boutin ha pemdeiek; heb ken ober aneze en eun doare na ve ket boutin, *kommun* a lavar sant-Bernard; *Communia facere sed non communiter*.

4. Eleac'h eta berna oberou a devosion pere, evit an darnvuia, pell diouz diskuiza ar spered a skuiz aneza, poëllet, parfetat ho oberou pemdeiek, oc'h ober aneze gand brasoc'h peuc'h a spered, brasoc'h kaloniezh hag *intension* bur. Ha zoken pa na hellet ket ober ho oll devotionou pemdeiek, diverreet-he; lekeet zoken eul loden vraz a goste, evit ma reot

gand peuc'h o spered an nebeud ec'h ellet ober. Aslennet var an dra-ma ar pezh hon euz lavaret war ar beden a galon.

5. Poëllet ispisial, parfetat dleadou ho stad, enno kaveet an huella zantelez. Penoz eo erruet sant Ambrez en renk ar zent? Abalamour o veza eskop, a neuz gret mad karg eun eskob. Ha sant Loiz, roue Franz? Abelamour o veza azezet war an trôn, a neuz gred mad karg eur roue. Gallout elleur lavaret ar memez tra euz ar zent all oll. Evit-ze sant Paol a c'houlenn m'en em barfetas peb unan en he stad.

6. Ebarz ar grouidegezh, Doue a c'houlennaz ma roze peb planten freuz, mez peb unan diouz he rum; *juxta genus suum* (Gen. 1. 11.) setu perag ar plant dispar a rô

freuz dishen. Peb planten mystik, skeden an ine, a dle rein freuz a zantelez, mez peb unan herve he rumm, da-lavaret-eo, diouz he stad. Evel-ze Elias en he vro gouë, ha David war an trôn a zo sant, peb hini en he zoare. Kentel talvoudek evit ar re, pere, en kreiz ar bed, a neuz c'hoant beva evel er gouent; hag er palez evel en bro gouë. Ar freuz a zo mad dreizo ho unan, mez na nint ket diouz ar gwez a ro aneze.

LIBERTE HA PEUC'H A SPERED.

1. Eleac'h, eme sant Paol, ema spered an aotrou Doue, ennou a renn al liberte hag ar peuc'h a spered. Ho c'haout rear dre daou zoare : 1^o Dre eun dispriz vertuzuz ha kalonek evit an temptazionou

a eskin ac'hanomp. 2^o O pellaët an dristidigez diouzimp.

2. An hini na vezo ket bet temtet, na vezo ket kurunet. Ar bar palmez na ve roët nemed dan trec'her, ha na n'euz ket a viktoar heb combat, evel na neuz ket a treherez heb stourm.

3. Evit trec'hi an darn vuia euz an temptazionou, ez eo gwelloc'h ho dispriza, evit Doue, evit ho enebi a dall; a nez, pe a vezzomp trec'het gand-ho, pe a vezomp trubulet ha doaniet gand hon viktoar zoken.

4. Pa dosta an demptation, ispisial eneb ar burete, hag ar feiz, kendalc'het ar pezh a vezet oc'h ober; na respontet ha na roet skouarn abet da atiz an diaoul. Mar c'hoanteet koulzgoude ober amzer-hag-amzer eur beden verr

ha birvidik benag, gret na zellint ket an demptasion; lavaret mar keret : O Jezuz ! ho karante, ha netra ken ! O Jezuz ! ma oll garante pegoulz eta vezo ma c'halon devet gand tan ho karante ?

5. Touët dac'h ho unan a dalek ar beure, na c'houlennet, epad an deiz, rei ho aotre, na dan demptasion na dan tempter, an drouk spered.

6. Lavaret neuze dac'h ho unan; na hella, na dlea, ha na c'houlenna klevet. Na hella, rag treou int hag a zell natur infinit an aotrou Doue : na dlea ket, rag ar gwir ghristen a spi da eur zentidigez humbl, ha nann eun enklas debronnuz; na c'houlenna ket, rag hag alfen zoken (ar pezh na neo ket) anaveout oll, na c'houlenna anaveout euz mysteriou ar religion, nemed ar

pezh a neuze teurveet an aotrou Doue diski dimp; evit gallout rei deza eun testeni euz ma zentidigez gwirion. Jezuz-Christ o veza lavaret : « Euruz braz ar re n'ho deuz ket gwelet hag a neuze kredet », (Joan. 20. 29.)

7. Na govezaet ket an temptationou, rag an aon da veza pec'hed a chomfe bepred en ho spered; euz eun tu all, an demptasion oc'heuz bet, ha noc'h euz ket roet ho aotre dezi, a zo kentoc'h delit evit pec'hed.

8. Bezet zentuz hag o pezo peuc'h. Eur zouch a ra poan dac'h na zeu ket digand Doue, eme sant Fransez de Sales; rag roue ar peuc'h eo. Pa sav eta eun doan benag en ho kalon hag a drubul ac'hanoch war stad ho konsianz, pe ho silvidigez, n'he

zellet ket evel eun atiz aberz an aotrou Doue, hogen evel eun demptasion.

9. Kredet mat, mont eneb ar skrupul, an arvar, neo ket mont eneb he gonsianz. Er c'hontrel miret aret dleadou ar gonsianz, pa zeo gwir a viret aliou ho rener. Lennet piz an drivet hag ar pevarvet chabistr euz leor an *introduction* dar vue devot, kaout reot enno kentelliou meurbed talvoudek war an temptationou.

10. Em viret c'hoaz ouz an dristidigez, galvet ken mad gand sant Franzez de Sales *eur goan kalet*, a lamm he gened digand ine, hag he ra dinerz, ha morzet en he oll galloudezou. An dud trist a zo hanval ouz ar glanvourien-ze, ha gemer ho poul-galon na boëd mad na boëd fall. Eun

heveleb denn a gemer poan euz ar vad evel euz an drouz.

11. Pa zanteet o tont eur penad melkoniuze benag; kemeret timat an tec'h araok eun enebour ken gwalluz. Klasket diverr-amzer, labour darempred, eur c'hoari benag honest, evit argazz pell diouzoze an diaoul kudennek pe teval-ze. Ezetoc'h eo zerri dorr hon c'halon oud'ha, evit na neo he lakat er meaz eur veach mazz-eo azeet enni.

12. Nehemiaz lavare dar bobl Israël, a oa he nerz ebarz n'he joauzdet evit an aotrou Doue. Na veet ket trist eta, rag joa an aotrou Doue eo ho nerz. (Esdras. 8. 10.)



KEMERET KEMENT A DIGOUE
GANEMP

EVEL DEUT EUZ DORN DOUE.

1. Hon nec'h oll a deu dre ma sellomp kement a digouë ganemp a rec'huz, pe dre reiz, *disposition* an natur, pe dre valiz an dud, ha na welomp kamed enno, dorn kuzet mez karantezuz eun Doue leun a vadelez.

2. Hon Salver a neuz lavaret hag an dra-ma zo a feiz : Na gouëo ket eur vleoen diwar o penn, heb aotre hon Tad a zo en env. Oll kounar an dud fall hag an diaoulou zoken na ouffen ober an distera drouk heb aotre an aotrou Doue; evita na c'houlenn, ha na hell goulenn ar pec'hed, a ro koulz-

goude he aotre dan drouk a-zeu evidomp euz pec'hed ar real. Na c'houlenn ket, mar keret, al laëronzi, en kement a ma-z-eo pec'hed laërez; rei ra koulsgoude he aotre dar gaou a deu dimp euz al laëronsi. Evit-ze Job na damalle na dar Galdeaned, na dan tan, na dan diaoul ar reüz a oa kouët warneza : ho zellet re evel deut euz grad vad an aotrou Doue. Na zave ket he zaoulagad war ar walen a skoë warneza, hogen war dorn Doue a dalc'he ar walen; hag a lavare : Digouët eo evel ma neuz plijet gand Doue : Ra vezo meulet he hano zantel. *Sicut domino placuit ; ita factum est ; sit nomen domini benedictum.* (Job. 1. 21.)

3. Zellet eta en grad an aotrou Doue kement a digoue genac'h war an douar; hag evit eun dra

beza poaniuz, ha vaeluz evidoc'h; kredet a neuz an Tad selestiel he reizet er guiz-ze, evit ho prasa mad, é pehini à glask bepred brasa mad he vugale. Digaz ra an drubul, evel ma c'hourc'hemen eur medesin eul louzou mad evit eur c'hlanvour; petra benag a tisplich al louzou ze deza, ha ma he zaol dioud'ha, ar medesin a dalc'h evit he c'hemero, rag he welaët a raï. Ebarz ar greden stard-ma hag ebarz an ober dioud-hi emä an ûhella zantelez : rag, evel ma neuz lavaret sant Jerôm, ober rear neuze kevredigez gand ar mad braz pehini eo Doue.

EUR GHIR C'HOAZ.

Goude beza gwelet an doare tleer miret ar dleadou gerenal ha

partikulier hon euz e kever an aotrou Doue, e kever hon nesa, hag en hon c'hever hon unan; hag a zo eun diverradur euz bue an denn hag hini ar c'hristen, a lekeomp ama choaz eun ali benag, evit ezetât ha nerza ar miridigez euz ar dleadou-ze.

SCRUPUL, AR VARDER.

1. Bez euz hag a zell ar skrupul evel eur vertu; eur si eo, ar c'hontrel, ha deuz ar re gwailuzza. Gerson a verk mad pezh ara aliez eur gonsianz skrupuluz, da lavaret eo a kemer brasoc'h nec'h evit na zo ret, brasoc'h drouk evit eur gonsianz laosk.

2. Ar skrupul a dewalla an ine, a geflusk ar peuc'h, a rô disfizianz, a bella euz ar zakraman-

ehou, a lamm ar iec'hed, a gwal ar spered. Ped, goude beza em roët dar skrupul, a zo follet! Pet all goude beza bet skrupuluz, a zo deut diroll! Sant Antonin, den gwiek braz, ha mestr er vue spirituel, a lavar an dra-ze. Pell diou-zoc'h eta ar c'hontamn euz devotion, ha lavaret gand sant Joesep Kupertino. « Na c'houlenna en » em zi na skrupul, na tristidigez. »

3. Ar skrupul zo eun doan faoz sorc'hennuz euz ar pec'hed, eleac'h na neuz abek abet d'he douja, koulsgoude ar skrupuluz na zell ket he doan hag he arvar evel skrupul, hogen evel tra gwirion; ouz he rener eta a tle senti pa lavar hema deza, na nint nemed skrupul.

4. Ar skrupuluz na wel nemed skrupul en dro d'he gonsianz, ha

nemed koler ha venjanz en Doue. Peurlies a eta a tle zellet en Doue he drugare, an hini euz he arroueziou a diskoë muia. He spered, he brederen, he galon a dle beza gand an dra-ze.

5. Ar gwir louzou evit ar skrupuluz eo ar zentidigez leun ha kalonnek. sant-Fransez de Sales a lavare, penos a oa hon orgouil kuzet a-re pad hon skrupul, abelamour ma-z-eo gwel ganemp hon c'hreden-nin evit hini hon tad rener. Hentet eta, a lavar ar zant, heb lavariou all abet nemed hema : « Senti a dlea » hag avezzot gwellaët euz ar c'hlenved reuzeudik-ze.

6. Ar vugale jaluz ha nec'hed a ra eur gaou braz ouz an Tad zeles-tiel; seblantout reont lavaret, e zeo eur pleg pouner, eur skla-

verez servicha an Doue-ze a garante hag a vadelez *divent*.

SENTIDIGEZ OUZ AN TAD RENER.

1. An oberou a devotion a dalveo nebeud da barfetad ho spered, mar na zentet gand aket d'ho tad rener; he gomz neo ket hini eun den, mez komz Doue eo. Gand ar zentidigez emañ ar fizianz; hep-zi na neuz nemed arvar, a lavar dimp sant Fransez de Sales.

2 Nankouaet ket ar reizou a ro dimp ar memez Sant : « dibri ha » diskuiza dre zentidigez, a blij » muioc'h da Zoue, evit iun ha » beila evel al leaned, heb ar » vertu-ze : » Hag en leac'h all : « dibri dre zentidigez, evit ober » c'hoant an aotrou Doue, a zo » gwelloc'h evit gousav ar maro,

» heb ar c'hoant-ze da zenti eyi- » tan. — An hini gred beza kuzu- » liet en eun doare dishenval, hag » a zinac'h senti, a zo eun touel- » ler, eur gaouiad. »

3. Eneb ho feuc'h eta ez a an ineou-ze, hag eneb dezo ho unan, pa na n'em glevont ket gand ho zad rener, pe a glasq tenna aneza d'ho menoz ha d'ho c'hoant. Henez zo eun orgouil zal euzus, ma-z-eo nebeutoc'h anaveet. Na neo ket dar beager diski he hent dan hini a henc'h aneza, na da eur c'lanvour alia ar medesin war al louzou a dle rein deza.

4. Evit an dereadegez zoken a ve aoualch gouveet digant an tad rener hag en vezzeur war an hent mad, heb klaskan abek a gement-ze.

5. Nankouat ket ive, a lavar

sant Fransez de Sales, penoz ar c'hovezor hac an tad rener a zo daou : « Dan tad rener a tizoloer » a gren an ine ; d'ar c'hovezor la- » varer ar pehejou hebken. » Goulenn-ra zoken na veket eun eurl, eur boutrennik en hon speret n'he diskulfemp d'hon tad rener.

6. Dre ar fizianz-ze a vugel, ha dre ar zentidigez-ze beo, paduz hag *universal* dan hini a rénn a c'hanoc'h, a tanvaéet en ho kalon eur peuc'h burzuduz. Gand nebeud poan a tastumfot tenzorieu braz a c'hraz, hag a vezzot sal uhelloc'h dirag an aotrou Doue ma o pezo bet brasoc'h zentidigez evit an ini a gomz dac'h en he hano.

Nota. — Peurliesà ar c'hovezor hag an tad rener a zo ar me-

mez hini. Dan ini kovezeer gandha, a lavarer ive nec'h ar speret pe poan ar galon, evit miret ha gwe-laot an eil hag egile diouz ma tere.

PEDENNOU BERR HA BIRVIDIK
da lavaret epad hon oberou pemdeiek.

1. Kerkent ha ma tifunet, a tere ouzoc'h sevel ho ine war zu an aotrou Doue, o lavaret deza : « O » ma Doue, ho karante ha netra » ken ! Karout ran beva da jamez » ennoc'h, hag evidoc'h. »

2. Oc'h em wiska, ec'h ellet lavaret : « O ma Doue, gwisket ma » ine gand vertuziou zantel. »

3. Pa nem diwisket, pe, pa troket ho tilad : « Ah ! ma Doue, » diwisket ma ine euz he visou, » gwallou, ispisial euz ar re dis- » plich muia d'ac'h. »

4. Araok kwitat ho ti, da viana
ar c'henta amzer ho bezo dac'h,
em lekeet dan daoulin ha lavaret :
« Hema eo marteze an diveza euz
» ma bue, a aotreo din an aotrou
» Doue en he vadelez, evit gwal-
» c'hi ma fehejou ha dilitout ar
» baradoz. Ah, ma Doue, c'hoant
» em euz d'he rei a gren dac'h. A
» chanon ma hunan nella netra,
» hogen oll ec'hellan ennoc'h ha
» ganec'h; ma Jezuz, kentoc'h
» mervel, evit lezel ar pehed
» marvel dont ebarz ma ine. »

5. Pen em gempennet, pe pa
sellet er mellezour : « Kemerr
» ran ken braz aket da blijout dan
» dud, ha ker nebeud da blijout
» da Zoue, a neuz ma c'hrouet
» gand ken braz karante, ha pre-
» net gand he oad ! »

6. O vont er meaz euz ho ti :

« Ma El mad, evezaet war ma
» daoulagad ha warnon oll, evit ma
» vezin bepred feal dem Doue. »

7. Pa-z-et dan Ilis : « Ma ine,
» brema ec'h ez da di Doue;
» eleac'h ma tle oll beza purete
» ha zantelez. Pell diouzin brema
» sonchou an douar, epad ma ve-
» zin er palez an envou. »

8. O vont ouz taol : « Tad tru-
» garezuz, epad ma vagfeet ma
» c'horf, maget ive ma ine gand
» ho kraz. »

9. Pa-z-et d'ho kwele : « Hema
» eo ar gwele a tiskuilz ma c'horf
» varneza, pegoulz a teuio ar mare
» eüruz ma tiskuido ma ine en
» Doue. »

10. Araok lavaret ho pedennou :
« Az pe zonc'h, ma ine, ec'h ez
» breman da zerc'hel kaoz gand
» Roue ar rouane, Mestr an domi-

» nationou an aotroniez, da strifa
 » dle beza kevatal, proportionned
 » daz dlead ha dhe vrazder.

11. Mar digoue dac'h kouëa en
 eur gwal benag, petra benag ma
 ve, lavaret raktal : « Ma Doue, o
 » pehi em euz gret ar pezh ec'h
 » ella ; choui, diskoëet din ar pezh
 » ec'h ellet, o pardoni din ma fe-
 » hed. O trugarekat ran, nem euz
 » ket gret gwassoc'h c'hoaz : evi-
 » don-me ec'hellen c'hoaz kouëa
 » kalz izelloc'h. » Na laket ken
 neuze ho spered gand ar pehejou-
 ze, nemed pa-z-et da govez.

Gallout alleur ober pedennou
 all hanval, epad hon oberou all,
 gand ma vezint gret gand fizianz
 ha karante ; dre an doare-ze, a
 kommanz diouz an dibab, a ken-
 dalch, hag ez eo peur c'hreat ar
 gwir zantelez.

DEVOTION

DA AGONI KALON JEZUZ.

.....

DEVOTION

Da Agoni Kalon Jezuz.

KENTA SKRID



But pe rat an devotion-ma eo :
1° Enori kalon sakr Jezuz o c'hon-
sav e pad he vue oll, hogen ispi-
sial en emzer he basion, gloaziu
braz en he galon evit silvidigez
an ineou ; 2° Kaout, dre an deli-
tou euz an agoni hirr-ze, eur maro
mad evit ar pevar-ugent mill a
dud, pe war dro, a varv peb deiz
ebarz ar bed oll. Na lavaran ket
re, eun dra anaat eo.

PEB DEIZ EUZ AR MIZ-MA.

1^o Enoret dismeganz kalon Jezuz o c'henel en eur chraou.

2^o Goulennet graz ar vadriand evit ar vugale a varvo hirie.

PEDEN.

O Jezuz meurbed trugarezuz, c'hui o c'heuz eur garante ker birvidik evit an ineou ! O pidi ran dre *agoni* ho kalon meurbed zantel, ha dre c'hloaziou ho mamm dinanm-krouët : goelc'het en ho koad an oll beherien euz ar bed a zo brema en *agoni*, hag a dle mervel hirie soken. Evel-ze bezet gret.

Kalon Jezuz en *agoni*, o peet

true ouz an dud a zo daro da ver-
vel.

Nota. — Hon Tad santel ar Pab Pi IX a aotre da gement hini a lavaro gand eur galon glac'haret, ar beden : « O Jezuz meurbed trugarezuz, » etc., gand ar verzed a deu warlerc'h, « *agoni* kalon Jezuz o peet true ouzimp, » er iez a garo peb unan, eun induljanz a gant devez peb gwech. Ha dar re lavaro bemde, teir gwech, da dri c'houlz euz an deiz, en pad eur miz, pen da ben, ar bedenn ma gand ar versed ha heuill, eun induljanz *plenier* an deiz ma plijo gand'ho, gand kovez gand glachar ho fehejou, kommunia, ha pidi devot enn eunn Ilis pe chapel publik, eur maread amzer, herve c'hoant hon Tad santel ar Pab.

An induljanzou-ze ec'hell beza gouneet evit an anaon (Dekret. Cong. Indul. 2 fevr. 1856).

KENT LAVAR.

Hon lennerien vezo anaoudek dimp da veza laket en penn al leorik-mâ an aotre roët gand hon Tad Zantel ar Pab Pi IX, da eur skrid berr gret ive gand an hini a neuz gret al leorik-mâ, moulet en ker Avignon dindan an hano : *devotion da galon Jezuz en he agoni*. Ar skrit berr a zo gand hema, hag a neuz bet ive aotre hon Tad Zantel, a zo hanvet: *devotion da galon karantezuz Mari*. O lenn ar pèz a heuill, lavaret gand eun Tad ker karantezuz, a veuloint ganemp preder hon Tad zantel

evit mad an distera euz he vugale..... Hon Tad zantel Pi IX, a neuz bet ho lizer hag al levr oc'heuz gret evit maga ha kriski devotion an dud vad evit kalonou Jezuz ha Mari. Ma c'harga ra d'ho trugarekât euz ho kennig; meuli ra, evel ma tere, ho preder da lakat dirag daoulagad an dud poanion ha gloazion Jezuz hon dasprener pe *redempteur*, ha re ar Werc'hez zantel Mari he Vamm. Gand an testeni-mâ euz he vadelez hon Tad zantel a aotre dac'houspenn, gand karante he venos abostolik evit mad bras ho korf hag ho ine. Roët e Rom 3 ebrel 1852. etc.





AGONI KALON JEZUZ

HAG

AR RE EUZ PEB DEIZ A ZO EN AGONI

I.

PEDET KALON JEZUZ EN AGONI

Evit ar re euz peb deiz a zo en Agoni.

An devotion ec'h alliomp dac'h,
lenner devot, a vezo, a gredomp,
digemeret mad genac'h. Ec'h ana-
vet ret marteze araok bremâ, rag
diskleriet eo abaoue pemp bloaz,
hag abaoue daou vloaz, hon Tad

zantel Pi IX a neuz roët he aotre dezi, hag he finvidikat gand induljanzou. Chetu ama petra c'houlenn : kenniga bemde d'*agoni* kalon Jezuz eur bedenn evit kaout gras eur maro mad da war dro pevar-ugen mill denn a varv peb de ebarz ar bed oll.

Gloaziou kalon Jezuz, hag evit laret, *an agoni* a dizec'haz ar galon garantezuz-ze epad he oll vuez er bed-mâ hag ispisial er jardin olive, chetu ar pezh zo c'hoant da enori dre an devotion-mâ; ar c'hraz dibriz euz eur maro mad goulennet stard digand ar galon karantezuz-mâ, evit ar 80,000 *agoni* a varv peb deiz, chetu ar pezh a c'hoanteer kaout.

Ine mad ha trugarezuz, na dina-c'hot ket d'*agoni* kalon ho mestr mad eun dra ker ezet, ha dar re

a varv peb deiz an aluzenn euz eur bedenn o zenno marteze euz an ifern !!!

II.

PEDET EVIT AR RE ZO EN AGONI.

Kalon Jezuz a neuz gonsavet evito an agoni ken c'huërv !

An aotrou sant Augustin a dalc'h evit gwir a neuz labouret Jezuz-Christ, adalek ma oa er c'havel, evit silvidigez an dud; hag ez eo bet Salver adalek kof he vamm. Euz eun tu all sant Paol a zekz dimp na ell ket en Jezuz-Christ, ar gwir a Salver beza dispartiet diouz an hini a viktim : ret eo bet a c'honzav-ze Jezuz-Christ. *Kristum oportuit pati. Ac'hano a*

teu ma-z-eo bet hon Salver Jezuz-Christ, e stad a *viktim losk* bepred sakrifiet hag eo en he galon a neuz kavet nerz evit-ze; en doare ma-z-eo bet bepred he galon viktim a c'hloaz; hag evel ma oa ar boan-ze braz direiz, a oa evita evel eun agoni pemdeiek; hag ec'h elleur lavaret heb aon abet a oa kalon Jezuz eur galon en agoni.

Hogen ar pezh zo bet kiriek euz ar verzerenti hir-ze a ra komz leor imitation hon Salver pa lavar : « Buez Jezuz-Krist a zo bet eur groaz hag eur verzerenti dalc'h-mat, (*) » ec'hellomp lakat, a gredan, ar sonj kren ha stard bepred diraza euz an niver braz-ze a

(*) Tota vita Christi crux fuit et martyrium.

ineou erru bemde karget a fallagriez ouz dorejou an eternite doujuz. Eun dra ken glac'haruz a rann ho kalon, pegement neuze a oa glac'haret braz kalon karantezuz Jezuz !

« Petra eo bet buez hon *redemptor* mad, a c'houlenne out-i santez Tereza, nemed eur maro » dalc'hmad; he boan vraz a oa » gullet he Dad flemmet en ker- » liez doare, hag kerliez a ine en » em goll ziousaz ! »

Pedet eta evit ar re zo en pall ar maro, o c'hui oll pere a garr kalon Jezuz, hag a c'hoanta lodenni he c'hloaziou gand'ha.



III.

PEDET EVIT AR RE ZO EN AGONI.

*Spontuz eo an niver euz ar re a varv
peb deiz.*

Jedou an dud gwiek ara gwelet
mad a varv peb bloaz gozik eur
million ha tregont pemp kant
c'huec'h mill ha tregont a dud
(31,536,000); peb deiz, *pevar-*
c'hant c'huec'h mill ha pevar
ugent (86,400); peb heur, *tri mill*
c'huec'h kant; da lavaret eo, war
dro *hanter kant* peb minud.

Diouz ar jedou-ze eo skler a
varv peb bloaz kerliez a denn war
an douar oll evit ma-z-euz a dud
en Franç; an dra-ze zo spontuz,
a lavarot din! Ia heb mar, ha

kouls goude ne ma ket en tu all
dar wirione, eun dra a wizigiez
eo.

Goude oll, netra ezetoc'h er
broiou eleac'h ma talc'her diel-
lou ar re varo, evit gwelet an he-
velidigez a zo etre a re a deu er
bed hag ar re a varv peb bloaz en
eur vro. En Paris, mar keret, war
eur million a dud pe war dro,
a varv, gozik kant bemdeiz, hogen
evel ma varver dre oll gozik er
memez doare, ez eo bet kemeret
Paris evit skouer; hag evel ma zo
war an douar, etre eiz ha nav
c'hant milion a dud, a zo bet gal-
let rein da anaveout ar wirione
spontuz, a varv bemde da nebeuta
pevar-ugent mill a dud.

O welet an niver spontuz-ze fal-
c'het gand ar maro; o welet an
niver spontuz-ze a ineo o vont en

ho eternite, petra refomp-ni? ha menel refomp-ni deseblant dirag eun dra ker glac'haruz; hag aoualc'h vezo evidomp hirvoudi eun nebeud evet an anaon reuzeu-dik-ze! Oh na vezo ket. Sonj hon devezo int euz hon zud, ar viktimou diniverapl-ze falc'het gand ar maro; ezint bugale Doue evel-domp, prenet evel-domp gand goad Jezuz-Christ, ha galvet evel-domp da c'hloar ar baradoz. Sonj on devezo ispisial a zo en ho zouéz meur a hini en stad a bec'hed marvel a zispil hust dan ivern; evit an *agonied-ze* a pe-deomp.



IV.

PEDET EVIT AR RE ZO EN AGONI.

Ho peden a salvo anezo.

Na lavaret ket : la, an dra-ze a zo damantuz braz! ranna ra ma c'halon! hogen peher ma hunan petra ec'h ell ma fedennou talveout evit silvidigez an *agonied*? Na dalvoient netra, nan netra, mar kredet a tennont ho vad euz ho tellitou c'hui; hogen mar pedet en ano Jezuz, mar pedet dre c'hloaziou meurbed dellituz *agoni* he galon sakr, hon Salver aro dac'h kred avezo chilaouët ho pedenn. Kement a c'houlennet digant ma zad em hano a vezo aotreet dac'h : *si quid petieritis patrem in*

nomine meo dabit vobis. Mar goulennet digane eun dra benag em em hano e aotrei dac'h : *si quid petieitis in nomine meo hoc faciam.* Na lavaret ken eta : ma gwestlous zo dic'hounid, ma fedennou na dalveontnetra. Ah! sonjet kentoc'h en talvoudegez goad adorapl Jezuz ; eur berad diouta a vize aoualc'h evit sovetat ar bed oll. Sonjet er verzerenti hirr a dri bloaz ha tregont a neuz gonzavet he galon sakr gand eur ker braz karante evit silvidigez an ineou. Sonjet en *agoni* glac'haruz ar jardin olived, elec'h ma oe trist he ine betek ar maro ; mamm an aotrou Doue na dinac'h ket dac'h silvidigez an agonied paour, mar ho goulennet gand karante dre c'hloaziou hag *agoni* kalon adorapl he vab Jezuz.

Pedet eta, ha pedet heb dale, an amzer zo berr ; re divezat vezo warc'hoaz ; pevar mill *agoni* an deiz-mâ vezo tremenet dirag kardor-varn eun Doue harner, an eternite vezo digor evito ; klevet o devezo ho barn ha na vezo kentoret ; ha mar boant peherien, an ivern digor didan ho zreid a neuz brema lounket ho ineou.

O kristen, a lenn an dra-mâ, en hano Jezuz stag ouz ar groaz, en hano *agoni* he galon sakr, na lezet ket mervel pevar-ugent mill euz ho preudeur heb ober evito, eur bedenn dan aotrou Doue !!! Eun deiz vezo pedet evidoc'h pa vezzot en *agoni* !



V.

PEDET EVIT AR RE ZO EN AGONI.

Ar zantela abegou a doug ac'hanoc'h dan dra-ze. Ar c'henta eo an anaoudegez vad. Petra na dleet-u ket dar galon adorapl a Jezuz, dar galon-ze a neuz lammet bepred evidoc'h ; ar galon-ze a neuz zakrifiet evidoc'h he joa oll ; a neuz roët evidoc'h he oll oad ; he agoni hag he merzerenti hirr baduz, a neuz o miret euz an ivern !

Brema chetu pevar-ugent mill euz ho preudeur hag a neuz ive gonsavet an *agoni* c'hwerv-ze evito : erbidi ra ac'hanoc'h da c'houlen evito pardon ha trugare ; rag ez cont da vervel ; ha meur a

hini diout-o a zo c'hoaz en stad a bec'hed marvel, ha dinac'h a reot ar vad-ze da galon ho mestr mad ; ha na reot-u ket kement zo en ho kallout, evit na vezo ket eur verzerenti ker hirr dic'honid evit silvidiges an *agonied* paour !!!

An eil eo ho vad ho unan : hag a c'hrasou a denno warnoc'h epad hopuez, ispisial war heur ho maro, ar garante ho pezo bet evit ho preudeur : Peseurd levenez evidoc'h en ho c'heur diveza, gallout lavaret ar bedenn-mâ dan aotrou Doue : « Aotrou, plijet genac'h » kaout sonj n'em euz ket, abaoue » mar a vloaz, lezet eun deiz da » dremen, heb na me pedet kalon » sakr ho mab evit an *agonied* » paour : ez-an da vervel ! aotrou » Doue ho peet truez ouzin. » Kridi ret-u a rai an tad a drugare

skouarn vouzar d'ho pedenn; ha
na deurveo ket Doue he vab, en
heur diveza-ze, ober diskenn war-
noc'h eur sell a deneridigez hag a
garante!. Oh! ia, kemer kalon,
kristenn eüruz ar galon zakr a
Jezuz a evesa war da *agoni*,
ha deuz lein an env a ro he
venoz daz hirvoud diveza. Na gle-
vez-te ket he voëz karantezuz o
c'hervel ac'hanout gand-ha d'he
varadoz. « Oh! te neuz kemeret
» kement lod en gloaziou hag
» *agoni* ma c'halon; oh! te neuz
» pedet ker birvidik evit sividigez
» ma bugale! deuz brema da resev
» an dic'haou dleet daz karante;
» deuz gant-o, evit beza gane-me
» bepred, ha tanva al levenez euz
» an evurusted eternal! » Ker kre,
ha krenvoc'h c'hoaz eo ar c'hom-
zou karantezuz a lavaro Jezuz,

war heur he varo, d'ar c'histen en
devezo pedet evit he vreudeur.

Euz an tu all, an ineou-ze o pezo
labouret evit ho silvidigez, dre ho
pedennou, a bedo ive neuze evi-
doc'h gand ar brasa birvidiges!
leun a herr hag a anaoudegez vad
a teuint da ziambroug a c'hanoc'h
evit saludi ho tigemer er baradoz,
ha kriski ar gloar euz ho triomph
pe gounid.

VI.

PEDET EVIT AR RE ZO EN AGONI.

*Skouer ar sent a doug ac'hanoc'h
dan dra-ze.*

Ar verc'h enoruz Mari Agreda
a disk dimp, en levr he diskadurez,
penos unan euz oberou a garante
ar Werc'hez zantel mamm Doue,

keit ha ma oa war an douar, e oa kennerza an dud klanv en pall ar maro ha pidi birvidik he Mab Jezuz evit silvidigez ho ineou.

War he skouer, ar sent oll a neuz diskoueet eun drugare vraz evit an dud en pall ar maro ; war gement-ze a lavarín dac'h eun dra a lennomp en buéz zantez Katel a Sienn.

Er bloaz 1370, eur marc'hek a Sienn, (he hano a oa *Andre-di-Nardino*) ken pinvidik en madou ar bed evel ma oa dibourve a vertuioù n'en devoa ken sonj nemed dibri, efa, c'hoari, drouk pidi eneb an aotrou Doue hag he zent, pa oe skoët en eun taol, gand eur goal glénved, hag he lekeaz war vord he ve. Person he barouz he aliaz gand karante da lakat urz en he gonsianz, hogen ar marc'hek-

mâ en kasaz kuit gand gêge louz. He dud glac'haret a bedaz goudeze meur a vanac'h da zont d'he welout. Roët oa deza an alioù ar muia krenv hag ar muia karantezuz, mez ar c'hlanvour defeiz a enebe dan oll. Dan diyez unan euz ar venec'h-ma a ia da gaout zantes Katel a Sienn ; ag e eun ez eaz, d'he c'havet o tont euz ti Andre-di-Nardino, evit goulenn digand Doue silvidigez an ine ker-mâ. Katel a oa estlammet neuze ha ne allaz ket komz gand-hi. O veza disestlammet war dro unek heur euz an noz, unan euz he c'hoarezet a lavaraz dezi neuze stad damantuz ar c'hlanvour. Ken buan en hem daolaz he fas dan douar, O pidi Doue na lezze ket ar reuzeudik-ma da vont da goll : « Nan eme an aotrou Doue, he falla-

griez a gri venjanz; drouk pedet
a neuz war-non ha war ma zent,
ha moustred gand he dreid skeu-
denn ma mam biniget » — O ma
Salver meurbed karet, a lavaraz
neuze ar zantez, mar niveret hon
fallagriez, denn n'allô herza ouz
ho koler gwirion? hogen bezet sonj
eoc'h bet diskennet en kof ho
momm hag eoc'h bet staget ouz
ar groaz, nan evit kaztia hon fal-
lagriez, mez evit ho lemmel. Pe-
rag eta tamal din-me fallagriez
Andre-di-Nardino; na non ket deut
da randeal gand ho kwir, mez da
erbedi ho trugare. O peet sonj
aotrou Doue euz ar gwestl oc'heuz
gret din, hag ive euz an urz
oc'heuz roët din da bidi evit ma
breudeur..... Petore frealzidigez
all em euz-me er bed-ma nemed
o welet ar bec'herien o tistrei ou-

zoc'h; mar lemmet al levenez-ze
digane; petra rin-me kenn amâ;
na distaolet ket eta ac'hanon hirie,
ha roët din ine ma breur.

Pedi eure ha gwela an nemo-
rand euz an noz, ha wardro goulo
deiz hon Salver a lavaraz dezi :
« Digemeret mad em euz da be-
» dennou ha da daërou..... me a
» distroo ar pec'her-ze. » Er me-
mez emzer Andrev a glevaz ar
c'homzou-mâ : « Perag na c'hou-
» lennez-te ket kovesaët; kovesa,
» ha me bardono did. » Sevel reaz
en he goaze hag a lavaraz : « Gue-
» let ha klevet ran Jezuz ma Sal-
» ver mad, gourc'hemenn a ra din
» kovez..... abelamour da Zoue,
» gret dont ar belek. » Kovez eure
gand eur glac'har braz, hag a
varvaz en peoc'h gand an aotrou
Doue.

Prederiet gand strif an taol-mâ euz trugare Doue, o c'hui a neuz tennet dre he vadelez euz trouz ar bed ! Ineou dilennet gand Doue, c'hui a vev ken peuc'h er gouent, en karante Doue ; skoueriet Katel a Sienn, ha n'ankounahet ket ez eo dac'h ispcial a zo roët karg da bidi evit ar beherien en pall ar maro.

Pelec'h a kaveomp-ni trugare evit an ineou reuzeudik-mâ, mar na ve en ho kalonou c'hui ? Piw a diskulio galvidigez uc'hel ar venec'h hag al leanezed en emzermâ a reuzidigez hag a drouklan. Piw a lavaro ar grasou braz en deveuz an aotrou Doue leket etre ho daouarn evit silvidigez ho breudeur divroët, ispcial evit an dud en *agoni* ? Hana neo ket hi a neuz ispcial digand Doue kevredi dis-

lavar da gaout lod e sakriviz he vab Jezuz, ha da nem kinniga a c'hrad vad gand'ha, evel viktimou evit silvidigez ar bed-oll.

O welet ar gwallou a dismantre an Ilis hag daole peb deiz kement a beherien en ivern, Zantez Theresza a lavare d'he leanezed : « O » ma merc'hed, en Jezuz-Christ, » skoaziet ac'hanon da bedi hon » Salver ma teurveo gwellaët eun » drouk ken braz. Evit an dra-ze » ez omp daspunct amâ ; ennez » eo abek hon galvidigez d'ar » gouent, hag a tleomp goulenn » digand Doue heb paouëz.

VII.

PEDET EVIT AR RE ZO EN AGONI.

Chetu ama eun doare benag evit

an dra-ze. En meur a doare ec'h
elleur ober an dra vad-mâ. An
denn he unan; eun nebeudik ke-
vret; pe en *breuriez*; evit-ze tis-
koë dac'h en berr gomzou daou
pe dri zoare.

KENTA DOARE.

AN DENN HE UNAN.

Peb kristenn ec'h ell war skouer
he Salver mad kinniga da Zoue
peb deiz tri zaskriviz evit silvidi-
gez an agonied; sakriviz he be-
denn; zakriviz he oberou, ha mar
ro Doue sonj deza, *gwestl* he vue.



1^o KENNIG AR BEDENN BEMDEIZ.

Ar bedenn-ze a ve gret evelenn :

O clementissime
Jesu, amator anima-
rum! obsecro te per
agoniam Cordis tui
sanctissime, et per-
dolores Matris tuæ
immaculatæ, lava in
sanguine tuo pecca-
tores totius mundi,
nunc positos in ago-
niâ, et hodie mori-
turos. Amen.

Cor Jesu, in ago-
nia factum, miserere
morientium.

O Jezuz meurbedt
trugarezuz c'hui o
cheuz eur garante
ker birvidik evit
an ineou! O pidi ran
dre *agoni* ho kalon
meurbed santel, ha
gloaziou ho mamm
dinam-krouët, goël-
c'het en ho koad an
oll bec'herien euz ar
bed, a zo brema en
agoni, hag a dle zo-
ken mervel hirie.
Amen.

Kalon Jezuz en
agoni peet true ouz
ar re a zo en pal ar
maro.

Nota. An tad zantel ar Pab Pi IX a aotre da gement hini a lavaro gand eur galon mantret ar bedenn diaraoc : O Jezuz meurbet trugarezuz ! etc., gand ar verzed : agoni kalon Jezuz etc., erieza gavo mad peb unan, eun induljanz agand deiz, kerliez gwech vezo lavaret; ha dar re lavaro hed eur miz, teir gwech bemde, en tri c'houlz, ar memez pedenn hag ar memez verzed, eun induljanz vraz en deiz ma plijo gand'ha, gand kovez, kommunia, hag an treo all merket evit gonid an induljanjou. Galout elleur he gounid evit an anaon (decret 2 fev. 1850)

2° KENNIG AN OBEROU :

Dre ar gir-ze a klevomp nan hebken al labourou, mez c'hoaz

ar gloaziu ha poaniou, ar joaou, ar plijadurezou, ha kement, en hon buez, ec'h ell beza kenniget da Zoue ; na neuz nemed ar pe-c'hed ave laket a goste.

En doare ma ec'h elleur ober eur zeurd kennig : Ar beure, da greiz deiz ha dann noz. Goude beza gret ar bedenn, o Jezuz etc., lavaret a greiz kalon : « O Jezuz » me ho kennig da agoni ho kalon » labourou, plijadurioù, gloaziu » an deiz-ma, evit ar pevar-ugent mill agoni a varvo en deiz-ma. »

3° GWESTL AR VUE.

Trugare da Benn abek an oll vad, betek en emzer-ma a ziroll a kaver kalonou braz ha na goust zakriviz abet dezo pa-z-eo mennek euz gloar Doue ha silvidi-

gez an ineou. Ia, a poëllou, an dud kalonnek-ma, ar garante vraz a d'oug eunn ine d'en em kenniga bemde da Zoue evel viktim a c'hrad vad evit silvidigez ar re ia da ver-vel. Goude oll er c'hinnik-ma na neuz na gwestl, na gir ave didan boan a bec'hed. Eur c'hoant eo euz ar galon a kenniger da agoni kalon Jezuz evit silvidigez ar pevar-ugent mill agoni euz peb deiz. Ha gallout elleur hem gwestla, hem zakrifia evit tra guelloc'h?

EIL DOARE.

KEVREDIK.

1^o Dre kevrediez a klevomp eur rum tud devod, pere evit ober ho fedemnou nerzuzzoc'h evid an dud

en *agoni*, en hem glev evit ho lakat oll kevret, ho heulia evit-ze eur reiz o deuz kemeret ho unan. Etouëz ar reizou-ze unan euz ar gwuella, hag a harzerez ha *routine*, a ve hema : dek denn en hem glev evit tenna, war ar re zo dare da vervel, gras eur maro mad. An deiz kenta pe ar zul kenta a peb miz, unan euz an dizenëz, dilennet evit-ze, a ro da peb hini eur skrid, hag a verk petore gloaz euz agoni kalon Jezuz a tleer enori ispisial.

2^o Evit ar rummou *agonied* a tle pidi dreist peb tra hed ar miz. Ar miz tremedet, ar skridou oll a zo dastumet a tennet a neve dar sord.



I. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1° Enoret dismeganz kalon Jezuz o c'henel en eur c'hraou !

2° Goulennet graz ar vadiand evit ar vugale a varv en deiz-mâ. O Jezuz meurbed trugarezuz etc., paj. 149.

II. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1° Enoret gloaziou kalon Jezuz o tec'hel evit bro Egypt.

2° goulennet konversion pe distro dar feiz gatholik, an Turket a varvo hirie. O Jezuz meurbed etc., paj. 149.

III. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1° Enoret gloaziou kalon Jezuz tro pad an tregont vlas a vevaz en ker Nazareth.

2° Goulennet graz eur maro mad evit an oll idolatred, an oll heritiket, ann oll schismatiket a varvo hirie. O Jezuz meurbed etc., paj. 149.

IV. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1° Enoret gloaziou Jezuz epad he dri bloaz vue anât.

2° Pedet evit ar gatholiket a Frans a varvo hirie. O Jezuz meurbed etc., paj. 149.

V. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1° Enoret ar gloaziu a c'hon-
save kalon Jezuz o sonjal en dis-
megansou a dle foat ober deza en
zakramand a garante, da lavaret
eo en zakramand an aoter.

2° Pedet evit ar ghristenien euz
ar bed a varvo hirie : O Jezuz
meurbed etc., paj. 149.

VI. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1° Enoret agoni c'huerv kalon
Jezuz er jardin Olived.

2° Pedet evit ar beherien kalle-
det a varvo hirie. O Jezuz etc.,
paj. 149.

VII. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ,

1° Enoret gloaziu kalon Jezuz
diansavet gand Per he abostol, ha
dilezet gand an ebestel all.

2° Pedet evit ar re a neuz *abu-*
zet euz grasou braz an aotrou
Doue, epad ho bue, hag a varvo
en deiz mâ. O Jezuz meurbed etc.,
paj. 149.

VIII. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1° Enoret gloaziu braz kalon
Jezuz o kaout he vamm glac'haret
war hent ar c'halvar.

2° Pedet evit ar re a varvo hirie
dre varo *soubit*. O Jezuz meurbed
etc., paj. 149.

IX. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1^o Enoret gloaz braz kalon Jezuz en emzer ma oe staget ouz ar groaz.

2^o Pedet evit enebourien hag eskinerien an Ilis a varvo hirie. O Jezuz meurbed etc., paj. 149.

X. SKRID.

Peb deiz euz ar miz-mâ.

1^o Enoret glachar dreist vuzul ha tristidigez c'huerv kalon Jezuz, dilezet war ar groaz betek ar mo-med ma varvaz.

2^o Pedet evit ar baganed a varvo hirie. O Jezuz meurbed etc., paj. 149.

TREDE DOARE.

An oll a oar penoz dre vreuriezh a klever eur kevridiezh devod, gret gand aotre an aotroun'Eskob hag arpastorevit ober kevret eurrumm pedennou, evit maga an devotion ha karante Doue. Hogen seblant tout ra dimp a neuz an devotion da agoni kalon Jezuz ar pezh a zo red evit ar vad braz-mâ. Madelez vraz an dra-mâ, hag he zalvoudegez a gredan tra krenv a oualc'h evit ober diouti eur vreuriezh.

Pastored leun a garante evit ho tenved, beleien ha renerien birvidik, lezet a c'hanon da diskulia da c'h ar vreuriezh mâ, hag a rei eur vad ken braz dan ineou a zo en ho karg; gret he miret en ho pa-

reziou, er c'hoenchou hag a kavot enni frez braz a silvidigez. Evit feat an doareou ha pedennou da ober er vreuriez a ve ezet ho reiza. Peb miz ar breudeur ha c'hoarezed en hem dastum-fe. Enno a ve roët skridou evit peb dekiat evel ma-z-eo skrivet pajen 153.

Evit tenna euz ar kevredigez-mâ an oll vâd a zo enni, a ve travad dan oll breudeur ha c'hoarezed kovez ha kommunia an deiz ze evel ma-z-eo lavaret pajen 150.

An tad rener a gavfe ive tu enno, da ober dar kevrediezh eur gentel birvidik; dougenn rafe aneze da welet an dud klanv, ispisial ar re en *agoni*. Derc'hell rafe evit ober kaout ho zakramanchou di-veza ispisial dar re na neuz ho c'herent aket abed evit kement-ze.

Dan divez a tigas ispisial sonj dar c'henvreudeur ha c'hoarezed penoz rat spesial breuriez *agoni* karrantez kalon Jezuz eo enori gloaziou ar galon zakr-ze, ha kaout dre ar bedenn bemdeiek eur maro mad evit ar pevar ugent mill *agoni* euz peb deiz.



DEKRET

EUS

Kongrégation an Indaljansou.

O clementissime
Jesu, amator anima-
rum! obsecro te per
agoniam cordis tui
sanctissimi, et per-
dolores Matris tue
immaculatæ: lava in
sanguine tuo pecca-
tores totius mundi,
nunc positos in ago-
niâ, et hodie mori-
turos. Amen.

Cor Jesu in ago-
nia factum miserere
morientium!

O Jezuz meurbed
trugarezuz' choui o
c'heuz eur garante
birvidik evit an
ineoù! O pidi ran
dre *agoni* ho kalon
meurbed zantel ha
gloaziou ho Mamm
dinam-krouet: goël-
c'het en ho koad an
oll bec'herien euz ar
bed, a zo bremâ en
agoni, hâgadle mer-
vel hirie memez.
Evel ze bezet gret.

Kalon Jezuz en
agoni ho peet true
ouez an dud en pal
ar maro!

DAR GER HA DAR BED.

DECRETUM

Ex audientia sanctissimi, die 2 februarii 1850.

Cum statutum sit hominibus semel tantum mori, et a mortis momento pendeat æternitas sive gloriæ in cœlum sive perditionis apud inferos, congruum est ut omnes Christi fideles pias sæpius preces apud Deum Patrem misericordiarum effundant ad implorandum iis qui in extremo vitæ statu

DEKRET

Eus audians an Tad Zantel, 2 choevrer 1850.

Evel maz-eo eur varn douget a tle peb denn mervel eur veach, hag ez eo euz pred ar maro a teu pe eun eternite a c'hloar er baradoz, pe eun eternite a boan en ivern, a ve mad a kennigfe aliez and dud fidel dan Doue a drugare, pe dennou humbl ha devod, evit ar re erru en pal ar maro, a ia da rein ho dis-

constituti animam agunt, divinæ gratiæ auxilium, sine quo impossibile est æternam vitam ingredi, quo fit, ut clementissimus Dominus eamdem et ipsis misericordiam pro infinita suâ bonitate concedet, qui hoc caritatis officium pro animam agentibus in vitâ præstiterint. Quapropter SS. D. N. Pius PP. IX, ut majorum in modum excitati Christi fideles in hujusmodi pio exercitio orandi pro animam agentibus intendant, precibus que sibi porrectis ad sacros indulgentiæ thesauros impertien-

haladen diveza, si-kour graz Doue, anez pehini na elleur ket erruot er vuez eternel. Ac'hane a teu, mac'h aotre an Doue oll drugarezuz, dre an nerz euz he vadelez divent, ar memez grasou dezo, hi, pere e pad ho bue, o devezo gret an dra vad-ze en kever ar re a zo en pal ar maro. Evit-ze hon tad zantel ar Pab Pi IX, evit dougen muoc'h-mui an dud fidel dan ober-ze a garante, evit ar re zo en pal ar maro, a neuz roët he c'hrad vad dar pedennou humbl a zo bet gret deza da digori evit ze

dos annuens omnibus utriusque sexûs Christi fidelibus, qui præfatam orationem quæ incipit : *O clementissime Jesu... cum versiculo : Cor Jesu*; quocumque idiomate, dummodo versio sit fidelis, corde saltem contrito ac devote recitaverint, *centum dierum indulgentiæ* pro quâlibet vice benigne concessit. Iis vero qui, eâdem animi dispositione, saltem ter in quâlibet die, tribus tamen distinctis diei temporibus, per mensem tum orationem tum versiculum recitaverint, *indulgentiam plenariam* die eo-

tenzorieu sakr an induljansou; hag a neuz teurveet aotre dan oll dud fidel, euz an eil sex hag egile, induljansou a *gant devez* evit kerliez gwech a lavaroient da viana gand glac'har a galon ha devot mad, ar bedenn a zo diaraok hag a deraou evellenn : O Jezuz meurbed trugarezuz etc., gand ar verset a deu varlerc'h: Kalon Jezuz etc., er iez a garo peb unan gand ma vo troët-mad. Hogen dar re lavaro ar pedennouma teir gwech an deiz, en tri goulz euz an deiz, a gand ar reiz a zo lavaret

rum arbitrio eligendo lucrandam quo vere poenitentes et confessi sanctissimum Eucharistiæ Sacramentum sumpserint, nec non aliquam ecclesiam vel publicum oratorium visitaverint, ibique juxta mentem sanctitatis suæ per aliquod temporis spatium oraverint, pari benignitate elargitus est.

Præsenti in perpetuum valituro, absque ullâ brevis expeditione, et cum facultate easdem indulgentias in suffragium fidelium defunctorum applicandi.

diaraok, dar reseo, hon tad zantel ar Pab a aotre gand ar memez madelez eun induljans *plenier* ec'h ellont gonid an deiz euz ar miz a blijo gand'ho, gand kovez gand gwir glac'har ha kominunia en deiz-ze, ha pedi devot en eun iliz pe chapel anat pe publik eur maread emzer herve c'hoant hon tad zantel ar Pab.

Evit talvezout bepred heb rei leze-nou neve, ha gallout da veza goneet evit an anaon.

Datum Neapoli, in
suburbano Portici,
die et anno quibus
supra.

Roët en Napl, fa-
bourz Portisi, en
deiz hag ar bloaz
diaraok.

† CARD. ASQUINIUS,

S. Congreg. indulgentia-
rum et SS. Reliquia-
rum præfectus.

† CARD. ASQUINIUS,

Prefet kongreg. an indul-
janson hag ar relegou.

FIN.

En ti AR GOFFIC, e Lanhuon.

ERRATA

Paj.	linn.	eleac'h	lennet
13	5	rein	rin
19	10	a roueziou	arrouézion
21	5	ezomp	ezom
24	21	sillidigez	fillidigêz
26	10	huja	juja
ibid	14	liout	tiout
ibid	15	manet	unanet
27	12	riez	zeiz
28	18	astennet	aslennet
33	7	sant Avilo	Ian Avila
39	5	gerentiaz	gerentiêz
42	16	herva	herr
43	10	tellou	teltou
44	10	deurveont	deurveout

Paj.	linn.	eleac'h	lennet
ibid	11	ha	na
49	6	ma	na
		(goude)	(ajoutez)
52	4	en devez	roët
54	9	deja	deza
55	11	var	veur
57	1	a rre all erru	ha re all ec'h erru
58	12	ezo	zo
59	4 et 5	hol lead	ho tlead
62	22	na	ma
63	16	zevredigez	kevredigèz
ibid	19	clan	glann
65	17	dellitez	dellituz
66	9	deseier	dézeür
67	6	inivaniez	unvanièz
68	16	gerou	gaou
70	16	euz	eür
ibid	17	à	
71	16	teuzet	tenset
73	22	dispennou	dispinnou
76	15	da	dar

Paj.	linn.	eleac'h	lennet
77	12	vismonaich	vignonaich
80	14	riskel	riskl
ibid	19	douger	doujer
82	14	reiz	reüz
88	6	ha	a
94	6	erbeder	erbeded
96	16	kalonnet	kalonnek
99	16	barfetaz	barfetao
100	2	dishen	dishenval
102	18	enklas	enklask
105	1	drouz	drouk
114	7	boutrennik	boultrennik

DEVOTION

Da Agoni Kalon Jezuz.

Paj.	linn.	eleac'h	lennet
122	4	ar vadriand	ar vadiant
129	18	kristum	christum

Paj.	linn.	eleac'h	lennet
134	5	evet	evit
135	12	ano	hano
136	17	mamm	nann,
139	17	mar	meur
141	17	diskadurez	diskleriadu- rèz
143	9	hag e eun	rag eün
144	10	momm	mamm
148	4 et 5	tiskoë	e tiskoein
149	7	sanctissime	sanctissimi
151	11	ho kennig	a gennig
152	1	la an dud	kalonnek-ma a poëlle da
153	5	harzerez	harz erèz.
156	6	a	he
166	3	aotre	aotrei

